

Breiz Brevez

“AR HI”

*eun danevell
gand*

Korantin RIOU

Hag eo R. B. O.

Radio Breiz-Izel?

Implij ar brezoneg e Plouvien

Keleier ar miz

N° 58 - 1982

BRUD NEVEZ

Kelaouenn vrezoneg mizieg.

**Niverenn 58.
Miz here 1982.**

Rener: Andreo Merser.
Sekretour: Jakez Salaun.

An oll lizerou ha skridou a zo da veza kaset da Brud Nevez, 6, ru Beaumarchais, 29200 Brest.

Priz an niverenn-mañ: 10 lur.

Koumanant-bloaz:

- priz ordinal: 60 lur.
- koumanant-skoazell: azaleg 80 lur.
- studierien: 40 lur.
- broiou estrañjour: 90 lur.

Eur houmanant a dalvez evid 10 niverenn.

Ar chekennou-bank a zo da veza kaset war-eeun da: Brud nevez, 6, ru Beaumarchais, 29200, Brest.

Ar chekennou-post a zo da veza lakaet war K.R.P.: « Brud Nevez » 893-94 P Roazon.

Ar houmananchou evid ar broiou estrañjour a zo da veza kaset, e arhant peb bro, da: Dawson-France, B.P. 40, 91121 Palaiseau Cedex France.

I.S.S.N.: 0399-7014.

Disklêriet hervez al lezenn: pevare trimiziad 1982.

C.P.P.A.P.: 34 627.

Ar merour: P.M. Mevel.

Moulet ez-prevez gand Brud Nevez.

C. evid an oll bennadou.

N'eus ket a aotre da adembann eur pennad diwar Brud Nevez heb beza bet an aotre d'henn ober.

Ar skridou hag ar pennadou a vez embannet e Brud Nevez n'emaint ket da veza lakaet war gont ar gelaouenn heh-unan, war gont ar re o-deus skrivet anezo hebken. Ar skridou ne vint ket embannet a vo kaset endro ma vez tu.

Embannet e vez BRUD NEVEZ gand skoazell EMGLEO BREIZ.

Taolenn

Korantin Riou: Ar Hi.....3
R. B. O.: Hag eo Radio Breiz-Izel?.....16
G. Kervella, J.S.: Ar Spontuz Circus.....33
F. Broudig: Implij ar brezoneg e Plouvien.....38
J. Goyat: Sean O Riada.....44
V. Seite: Ar Frer Frañsez Uguen.....46
Euz an eil devez d'egile.....48
Lizerou.....54

AR HI

Skaot e flammine an heol, ken e lufre, dindan e vannou pinvidig ha brokuz, megeriou bet razet gwechall, eur gwechall ankounac'heet gand an oll, kazi zur.

Eur hi rouz, dioukouarn du, lostig demvelen, a biltrote er ru.

Eun tenn a strakas. Hag ar paour-kêz ki rouz, goude eun hir a jal-padenn skrijuz, truezuz, war zisterraad, a jomas astennet, war an ter du, e deod er-mêz euz e henou, o tiskouez e zent hirra. Eur stroñ-sadennig bennag gand e baoiou a-dreñv, ha ne fiñvas ken.

Stalafiou a zigore, goustadig, demaonig, poulzet a-vad gand ar c'hoant gouzoud piou, euz peleh, a helle beza tennet war an tamm ki-laou-ze, e-unan beteg neuze o veva er ru, digenvez gand an aë.

Trumm e savas eur vouez maouez a-dreñv eur stalaf melen, korn-zigoret, hirgarrezig teñval er voger loued, dindan eun doenn teol ruz-du.

He mouskan melkoniu, war uhellaad da beb poz, a embanne:

*Donaldo, Donaldo,
da gi a zo maro,
da gi karet Faro!*

*Donati, Donati,
e-neus lazet da gi,
evid diskar da di!*

*Donaldo, te 'r gwella:
Donati zo d'laza,
ar mañsoner falla! (1)*

Krena 'ree ar vouez, muioh-mui, raouliet a fulor. A-dreñv ar stalafiou, zoken ar re chomet serret, e tleed kleved ar vouez o yudal garo he hlemmigan ha galv da laza.

Diou wech e kanas-hi ar memez rimodell. Ha p'he-doe echu, warlerh eur garm skiltruz, e savas an heveleb kan gand eur plah yaouank pe eur grennardez, entanet, daoust d'he mouez disterig: *Donaldo...*

Hag e strakas eun eil tenn a zigornas stalaf dehou ar hanerezed. Med ne drohas ket ar han, war eun dro klemmuz ha spontuz, leun a gasoni dispaket-krenn.

Tavet 'oa ar vouez pa zigouezas eun oto-polis er ru. Ar ganerez kenta, euz he frenestr, heb en em ziskouez, a huchas dezo: «Ar hi!»

A-zav e chomas an oto e-kichenn al loen.

– « Da biou eo hemañ? a houlennas eur polis. C'hwí oar?... Ya, c'hwí oar! Dit-te eo, Ursula?
– « N'am-eus ki e-bed; n'am-eus ket, me, boued da rei d'eur hi!
– « Ha dit-te neuze, Carlotta?
– « Nann!
– « Piou 'gomzo?... Den, evel kustum. Ar hi-ze a vefe eur hi kollet, stlapet er-mêz euz eun oto touristed o tremen dre amañ, goude beza e lazet! Heñ! N'eo ket an dra-ze 'zo c'hoarvezet?... Nann?... Ha ne vefe ket eur hi e-nefe en em lazet dre garantez?...»

D'an ti-kêr ez eas ar polis da lared d'ar mêr rei urz d'e gomis interi ar hi, tost da doull loustoniou ar vorh. Eno e-nefe kompagnunez ar chas beo evid diverra e amzer.

Neubeud goude, eur vandennad bugale a rede beteg ar horv maro, da rei d'ar hi rouz e lost melen, eun ambroug kenta klas beteg bered ar chas.

«– Me 'oar, me, da biou eo ar hi-ze, a juchumuche Massino d'e vignon Mateo, evel m'e-nije dizoloet dezañ eun afer-Stad. Da Vartolomeo Donaldo, ar mestr-toer, hag e-neus topinet ha flatret Giuseppe Donati, ar mestr-mañsoner, da veza flodet sigaret amerikan. Va zad a lare kement-se da va mamm, ha me a-dreñv an nor... heb goñd dezo!»

«– Pfi! n'eo ket dao ken selaou a-dreñv an noriou, a responte Mateo. Klev ar vamma o kana adarre: *Donaldo, Donaldo...* Ha sell ouz he merh Mari eur gouel du ganti war he fenn stouet, tre kichenn karrigell ar gward, o leñva da gi-chase he zad.»

Er mod-se e oa interet Faro, ki ar mestr-toer Bartolomeo Donaldo, orezumou bugale Gardavido o heulia klemmigan e vestrez, enor diweza rentet dezañ, eiltoniet gand yudadeg oll jas ar barrez e koun o mignon pe enebour, med euz gouenn ar chas, evelato.

Eur hi bennag a yude c'hoaz p'erruas Bartolomeo er gêr euz Carneosto, goude e zevez-labour tenn. Tomm e-noa bet war e doenn. Goulenn a reas dioustu eur mell gwerennad dour yen, evid diskarnila e staon hag e houlañchenn o tevi, evel ma vije bet pebr bruzenet o tiskenn enni.

E verh a roas dezañ e vanne, he fenn atao stouet ha kuzet dindan he gouel du, he dorn o krena, evel m'he-dije bet aon rag he zad. E wreg a zelle tristig outañ e-pad ma lonke, goustadig, o kemer plijadur dreist, o santoud an dour sin o tistana dezañ beteg e zeuliu.

«– Na vad a ra!» emezañ, en eur lakaad e werenn houlo war an daol.
«– Tad, eme neuze Maria, tad: Faro, an Donati e-neus e lazet! Interet eo bet bremaig, tost da doull an diskargou, war hent Obaldo.»
«– Donalti? Ar mestr pri-yod e-neus lazet Faro? Dao eo din restaol dezañ e zismegañs!» Lufra 'ree e zaoulagad gand an imor ruz.
«– Ha n'eo ket toud!»
«– Petra c'hoaz 'ta?»

«- Donati, tennet e-neus ivez war on ti. Torret o-deus e blom korn stalaf dehou prenestr ar gambr.»

Diwar diz ez eas Bartolomeo betek ar gambr, ha selled ouz ar stalaf. Hag eun drede tenn a skoas ouz ar hoad. Sklisennou a gouezas harz treid an toer hag er ru. Fuc'ha 'ree Barto: « Ma fuzuill! ma fuzuill! Mond a ran dezañ, laza 'rin an tamm ki-lor-ze! Hag a-raog an noz, boughurun! Pe dizenoret e vim!»

Kemer a reas peg en e arm, ha pignad gand ar skeul betek ar grignol. Eno e oa eur prenestrig ront, eul lomber; alese e weled brao ti an Donati, hag e helled respont êz-tre da dennou ar mañsoner diaouleg.

An diou vaouez a zellas an eil ouz eben, hag en em vriatas stard.
«- Eun den da dad, Maria!»
«- Va zad, e bar n'eus ket war an douar!»

Diwar e hrignol, ar Bartolomeo a wele dirazañ kuchennad tier ar vorhadenn, o zeol o teñvallaad buan, e-pad ma skede c'hoaz en uhel, bannou diweza an deiz. Edo an dud o vond da zebri koan. Lod a oa azezet war dreuzou o zi; rag distannoh oa bremañ an êr, ha sinnog ebed el lojeiz, pa'z ee da veuzi gwrez spontuz an heol gouest d'ho lakaad da vond droch, en eur vrouda ho nervernou gwasoh eged gwin Marsala da fin eur friko, pa vez ho penn o trei, hag o sevel dirag ho taoulagad eur bed nevez, o vodenni ennañ faltaziou ho spered trellet.

Kreskaad 'ree ivez fum an toer a-feur ma tiskenne an heol trema ar mor tost...

Hag eur hi... «- 'Sell 'ta! Fri-du an Donati daonet! Ha va den mad, sell ar pez a ran da da gi!»

Eun tenn, didruez, p'edo al loen didrouz o hwesa an hent el leh m'edo bet astennet Faro. Eur yudadenn hir, leñvuz, gwad ruz war an ter du. Ha fiñv ebed er ru, e-pad eur predig-amzer a netra.

Nag a reuz goude! Chalpadeg er rouznoz, dindan lagad eur steredenn bennag o tiskoacha euz donder an oabl glaz, e-kichenn al loar goapauz gand he Yann e veh lann. A-benn eun hanter-vunutenn, kristen ebed ken o fumi war an treuzou, pe o saouri e zoubenn an ognon pe e bladad fao, a-raog mond da zelled ouz an tele «brein» (med mond a reer memestra!), ha n'e-neus nemed darvoudou displijuz da ziskouez deoh d'an eur-mañ: tangwall er hoajou, diskar ar moneiz, ar petrol o kerraad, hag ar bevañs ivez, brezel a-gleiz, brezel a-zehou, ha komzou flour pe hanas ar bolitikerien ruz, roz, melen, gwenn, du, briz, hag all...

Med ar brezel, amañ, er ru, ema hirio, ar brezel etre Donaldo ha Donati, pe etre Donati ha Donaldo, hervez ma'z eur kamarad d'an eil pe d'egile. Eun dra 'zo sur: da ziwall 'zo; ha mad eo mond da weled e pe stad ema ar fuzuill pe ar vindraillezig, chomet er vro a zilerh an diweza soudarded tremenet dre amañ, bremañ 'z eus tost da zaou-ugent vloaz zo. An Donaldo hag an Donati, o-daou o-deus mignoned vraz hag... enebourien douet. A-du pe a-eneb, dao eo dibab evid beva! Hag, a-wechou, e lazer... evid beva: kiger pe leue!

Den ne zeuas da zastumm Fri-du: warhoaz e vo deiz, ha marteze e kaso ar gward ar horv d'an toull, heuliet, evel hirio, gand oll vugale gêr, o vale war zonerez chalp.

Edo serret an oll stalafiou, ha goulou enaouet e peb ti. Nemed e daou, unan war du an niverennou par, an eil war du an niverennou dibar...

*Maro da gi, Donati,
lazet ez treiz da gi,
da vignon du e fri!*

*Donaldo, Donaldo,
ar boh toer divalo,
'n-eus trohet ennañ 'r beo!*

*Donati, Donati,
te eo ar gwella en ti:
frik da Zonaldo e fri! (1)*

Eur vouez maouez a zave euz ti Donati: edo ar wreg o kana ar han da isa, ha, war eun dro, klemmgan he halon war blanedenn dorret Fri-du. Hirraad a ree an I hag an O e fin peb gwerzenn, hag echui peb poz gand eun doare leñv kounnaret.

War he lerh e oe klevet eur paotr yaouank, eun tammig skiltr e vouez, teuk a-wechou, dizingal, dihouest da gas da benn ar pozioù evel ma ree ar vaouez. Mouez Pietro oa, Pietro, mab an ti, hag an oll a ouie ne zisplije ket dezañ selled ouz Maria Donaldo, daoust d'an enebiez etre an daou diegez. Mez laza e gi! Nann, bez' ez eus torfejou dinatur ha n'heller ket pardoni anezo, na pardoni d'ar re o-deus greet anezo, d'an nebeuta war an tomm. Hag e vefe tad ho muia-karet! Rei taol ar maro da Fri-du a oa unan euz an torfejou-ze, a lak ar peher da veza izelloh eged renk izella an dud, a ra anezañ eul loen gouez.

Eun eil tenn a sklakas splann en noz o tiskenn primmoh-primma. Eur werenn euz prenestr uhella ti Donati a gouezas, brevet, war ar ru, gand eun trouz sklinton, ha mantruz. Eun toull a reas ar plom e speurenn ar gambr. Krenn e trohas ar han... evid eur houlig, rag adarre e savas en noz: *Maro da gi...*

Didrousoh e tremenas an nozvez eged an abardaez. Pep hini, skuiz gand e labour hag an darvoudou dindan an heol bero, a gavas gras kousked e peoh, da zizoñjal, evid eur mare, an enebiez etre an daou DO. Neuze, bez' e heller diskolpa tammou stalaf pe vruzuna eur werenn, heb kaoud c'hoant da laza perhenn an ti. Warhoaz e vefe tro adarre, marteze, da zelled a-dreuz an eil ouz egile, evel chas dirag eur preiz, da zibenn eun abadenn-jase.

D'ar mintin, ez eas sañset Bartolomeo da glask e doenn, ha Giusep-pe a guitaas ar vorh evid e gefridiou e kêr.

Dindan he gouel du, e kemeras Maria Donaldo hent ar «vered», da lared he meuleidiou da Faro, interet bremañ er memez toull ha Fri-du. Rag hemañ a oa bet dastumet gand ar gward. Hag ar gward, paotr fin anezañ, a gavas brao, dre ma oa èsoh toulla, distanka war Faro evid bezia Fri-du. An daou enebour a oa eta lojet, ma heller lared, er memez loch. Hag e peoh! Meuleidiou Maria a nije ivez 'ta war Fri-du. Ar pezh ne zirenke den.

E-pad m'edo Maria dirag bez ar chas, Pietro Donati, war e voto, a zeue, an didrousa ma helle. A-zav e chomas a-dreñv eur penn-moger, eun hanter-kant metrad bennag euz Maria. Da hortoz. P'edo ar plah yaouank o vond kuit, e tostaas d'e dro ouz ar bez, o soñjal chom aze eur pennadig da gana en e spered gloar Fri-du, ar hi mad, joa e vestr...

Keja 'reas an daou zen yaouank, ar voger etrezo, heb eur zell. Ne vefe ket bet deread, hervez an natur hag ar reiz, o-dije sellet an eil ouz egile, pe e vije bet dao dezo ober sellou du, p'edo o zadou o kendirviz dre dennou fuzuill, beteg drailla stalafiou gwer war di an enebour.

Rag o-daou – divinet ho-peus evel tud Gardavido – en em gare atao, daoust d'ar reuz etre o familhou. Pietro a oa eur reder war voto, brudet er hornad. Eet e oa ar maout gantañ eur wech pe zioù. Peurliesia, ne oa nemed an degved pe ar pemzegved. N'eus forz, eur moto e-noa. Ha trouz a ree er harter, da vouzara, da droha deoh ho c'hoant kousked. Ar pezh a oa kaoz euz eun tenn bennag a-zioh e benn, pe tostig-tre d'e rojou. Eun dro pe zioù e-noa greet beteg kêr gand Maria Donaldo. Evid diskouez dezi e ampartiz, hag... e garantez!

Hag e dad, ha gwerzet e-noa sigaret amerikan, bet digaset er porzig gand eul lestrig herruz? Ha topinet e oa bet gand an toer, evel e konte Massimo da Vateo? Amañ, e vije bet respontet deoh gand peb Gardavidad: « Me, m'henn tou, n'ouzon netra. Eun dra vad eo, en tolead, beza mud, ha dall, ha bouzar, pa vez ar polis o hoari fri-furch. Den ne oar netra, netra, ha mad pell 'zo! Traou 'zo n'hellont beza renket nemed kenetrezom-ni, tud ar barrez.»

Ha peoh a vez evel-se? A! Nann! Piou 'vo ar mestr, piou a reno an aferiou? Piou a roio ba bep hini ar pezh a zo dleet dezañ? Donaldo? Donati? N'eo ket braz ar rouantelez, mez stard eo ar stourm – e-kuz

an alies - etre an diou gostezenn. Eur Roman koz-Noe e-nefe laret: «Gwell eo ganin beza ar henta amañ (eur hoz toull-laou en Alpou!) eged an eil e Roma!» Peb kog a rank ober gand e vern-teil. Ar pezh a gont eo beza mestr nemetañ warnañ. Gand an argant e heller dond da veza roue ar bern-teil. Ha ne vez ket greet anezañ «kaoh an diaoul?»

Ouspenn, pep hini a ren e aferiou 'vel ma kar: eun toer, eur mañsoner, a hell beza war e chantier e-pad an deiz, ha gwerza sigaret pa zeu an noz, heb ma vefe «gouezet» an dra gand den ebed. Eur halz a gemerfe zoken war o devez-labour, evid kas da benn o «aferiou personel», e-giz ma laront. Implijidi ar gouarnamant a hoari ivez ar jeu. Dao eo beva!

Ar re yaouank 'avad, p'en em garont evel Pietro ha Maria, eo gwel-loh dezo ober an dizeblant, pa dro re da fall an darempredou etre o familhou, da hortoz diskouez adarre beza moumoun an eil gand egile, pa zavo an heol war-lerh an arne.

D'an eil devez, e reas ar paotr eur zell ouz ar plah, eur zell a zeblante beza tener a-walh. Hi a respontas, stouet he fenn, gand eur min-c'hoarz a-veh tristig, war he muzellou demzerret. Ar halonou yaou-ank a heuill reolennoù ha n'int ket ar re a lak an tadou da laza ki an ti.

D'an trede deiz, e kinnige Pietro plas da Varia war e voto, evid eun droiadig war ar mêz, dindan an olived hag ar pin-disheol. En eur zistrei d'ar vorh, e laras-hi dezañ: « Me 'breno eur hi evid da dad; eun eil Faro e vo, te 'welo!»

Petra respont d'eur hinnig ken hegarad ha ken reiz? Ne oa ket da dorta. Ar paotr, hag eñ spered eun tammig poud hervez e skolae-rien, a gomprenas buan ar pezh e-noa da ober euz e du. «- Mad! eur Fri-du nevez a ginnigin dit evid ma vo echu ar brezel etrezom, pe gentoh etre on tadou ha mammou. Rag, evidom, or harantez he-deus miret ouzom da gemer perz gwirion er beh savet etre or herent. Ha peogwir ema echu ar hañv e koun ar chas, gwella on-eus-ni da ober eo sevel eun emgleo etre on tiegeziou en eur renta dezo, da genta, enor ar hi-chase.»

Koulskoude, d'an abardaez-se, e oa c'hoaz tennou er vorh. Crispino,

eur henderv da Zonaldo, a dennas war ziminal Donati. Pemp munut war-lerh, Gaetano, contr koz-kabah Donati, a zihaste e respont war ziminal Donaldo. A laras! E gwirionez, e blom a yeas da hwitellad kalz uheloh eged an doenn. Med tu ebed da lakaad ar paotr koz da anzav e-noa c'hwitet.

Aheurtet e chome, gwasoh eged eul louarn besk p'e-neus greet tro-wenn. «Klevet am-eus, emezañ, an tammou mein o koueza!»

Pemzetgez goude, e laras Maria d'he mamm: « Mamm, me zoñj din am-eus kavet eur hi da gemer plas Faro. Eur Faro II... Hag ema e toull an nor. Eur hi brao, mamm, hag a blijo da dad. Eur chaseour dreist, finnoh eged oll jas ar harter.»

Pietro a gonte kemend-all d'e vamm, o kana gloar Fri-du II, ki dispar evid diskoacha lapined, gedon ha klujiri. Enor a rafe da dad.

An daou ozah, pa zistrojont d'ar gêr, echu o aferiou ganto, a gavas 'ta peb a gi o fistoulad war an treuzou. Ken laouen e oent ma kemer-jont pep hini e fuzuill evid rei kelou d'e amezeg brein e oa ki en ti, evel a-raog.

Med an tadou a fellas dezo goud ervad penaoz e oa deut ar chas burzuduz da goud o hent beteg aze.

«- Piou e-neus gwerzet dit-te ar hi kaer-ze? a houlennas Bartolomeo. Respont buan, pe 'savo trouz amañ.»

Maria: «- N'eo ket me e-neus prenet ar hi. Roet eo bet din...»

«- Gand piou 'ta? Piou eo an aotrou brao-ze, divergont a-walh evid kinnig eur hi d'am merh-me?... Kinnig eur hi d'am merh! Droch eo an den-ze...pe e galon zo leun a ziu fall! Ma fuzuill! ma fuzuill!»

«- Tad, tad, gortozit. N'eo ket droch, n'eus ket a ziu fall en e galon... nag en e gorv... Ha me... a...» (Besteodi 'ree kement, ma ne oe ket tu da gompren anezi.)

Edo Maria, daoulinet dirag mestr an ti, he zellou troet ouz al leurzi, o ouela evel eur Vadalen o houlenn truez. He mamm a drohas berr

d'an diviz, a oa e riskl da drei da fall.

«- Deom da gousked, a laras-hi. An nozvez a zigas ha peoh ha kuzul, hervez fumez or re goz.»

Eur vran a nije euh an ti, he beg troet war an tu dehou. «- A hell beza gwir,» asantas Bartolomeo, a zelle ouz an oabl, en eur skraba e benn, a-zioh e skouarn gleiz.

Giuseppe Donati a houlenntas ivez e vab. Responchou Pietro a oa demheñvel ouz re Varia. Hag e vamm a laras ivez mond da gousked da Gerhun, da hortoz didrabas sklêrijenn an deiz da zond, ha sklêrijenn war gudenn ar hi.

D'ar mintin 'ta, beh dezi adarre en daou di. Erfin e oe dao disklêria ar wirionez penn-da-benn d'ar gerent.

Maria: «- Pietro Donati eo e-neus prenet Faro II, evid rei anezañ deom. Ya, deom, n'eo ket din.» Ha Pietro: «- Maria Donaldo eo he-deus prenet Fri-du II, evid rei anezañ deom. Evel-se, e soñjom-ni, ez ay mad an traou etre an daou diegez diwar-vremañ.» Ar gerent Donati hag ar gerent Donaldo a respontas: « A? »

An daou gi a yee gand joa da jaseal asamblez, da heul Maria ha Pietro. An nevez-amzer oa. Glaz an oabl digoumoul. An daou amou-rouz oa leun a levez, o vond dorn-ha-dorn, en avelig flour, dindan an olived hag ar pin-disheol.

A-raog e savfe re a gaoz diwarbenno, e oa red kovez krenn d'o herent o c'hoant dimezi. Eur zulvez, kent mond da vale gand he haredig, e laras Maria d'he zad: « Goud a rit e karan Pietro Donati. Dezañ e timezfen, gand hoh aotre-c'hwi, tad ha mamm.» Ha Pietro d'e dad: «- Maria Donaldo a garan, evel ma ouezit; dezi e vefen laouen da zimezi, gand hoh aotre-c'hwi, tad ha mamm.»

Ar gerent a respontas: «- Gwelet e vo... Faltaziou yaouankizou eun tammig tommet o halon gand broud an nevez-amzer... Eveldom-ni...

gwechall!» Eur goulm a dreuze an oabl. « War an tu dehou!» a laras pep hini... Hag an tadou ha mammou da anzav: « Setu ar pezh a guze prov ar hi!»

Ar zul war-lerh, war houlennt ar re yaouank, Camillo, eun eontr da Bietro, ha Leone, eun eontr da Varia, a yeas da gaoud Donaldo ha Donati, pep hini en e di. Goude komz euz al labour toer hag euz al labour mañsoner, goude konta hag adkonta an olived, ar gwez orañjez, ar renkadennou gwez-rezin, ha tabutal war stad an traou all, evel kenwerz ar sigaret amerikan, kresk spontuz ar rollou, e oa pedet an oll da di Giuseppe Donati, evid klevet an daou dad o tisklêria: « Ya, mad eo e vefe dimezi etre Pietro ha Maria. A-raog eur miz e rank beza greet an eureud. Ha c'hwi, Maria, ha c'hwi, Pietro, e vo red deoh lida anezi hervez e vo displeget deoh, pa vo deut an deiz merket ganeom. Senti rik ouzom a reoh beteg munut diweza ho puhez tud dizimez. Ni a fell deom diskouez e savit ho tiegez daoust da stad on darempredou, anavezet gand an oll er barrez.»

«- Evel-se beza greet! Gand ma vim asamblez or buhez-pad, ne reom forz!»

Gand spoum gwin Asti e oa « siellet » an emgleo. D'ar meur, an daou zanvez-pried a yeas, war voto, beteg kêr, da brena ar bizou.

Miz goude, dirag ar person, laouen o weled diou familh « enebour » oh ober ar peoh, edo Maria ha Pietro, kichenn-ha-kichenn, fas d'an aoter. (2) Med ne badas ket pell mousc'hoarz euruz ar beleg.

«- Pietro Donati, ha felled a ra deoh kemer da bried, hervez lezenn or Mamm zantel an Iliz, Maria Donaldo, hag a zo amañ?»...

Respont ebed. « Mouzet ar paotr? ha d'an eur-mañ? Koulskoude, hervez e konte din va harabasenn...»

Ar gerent a zelle gand evez ouz ar gwer-liou, skeudennet warno merzerinti Sant Sebastian, Sant Frañsez o prezeg d'al laboused, hag ar Werhez Vari o pignad d'an neñv. En iliz, den ne fiñve; ar paotr-

enor e-noa kavet mad serri e zaoulagad, ar plah-enor he-doa kemeret he mouchouer. « Ya, a zoñje ar person, nijet kuit da vad e vout-c'hoarz, re vrao an taol! An enebiez etre Donati ha Donaldo a zo treh, eur wech muioh, d'ar garantez!»

Eun eil gwech, e reas ar beleg ar goulenn. Neuze Pietro a zavas, a droas kein d'an aoter, hag a zellas ouz e dad. Hemañ a stouas e benn eun disterraig, eun netraig. Pietro a zistroas ouz ar person: « Ya, me fell din!» Ouf! setu eur ya!

Ha bremañ d'ar plah yaouank:

«- Maria Donaldo, ha felled a ra deoh kemer da bried, hervez le-zenn or Mamm zantel an Iliz, Pietro Donati, hag a zo amañ?...» Grik. Eur hiz nevez? Eur froudenn da zizmeganisi an Iliz, da ober goap ouz ar gerent, dirag Doue hag an dud fidel?

An Aotrou person, eun tammig imoret - êz eo kompren e zantimant! - a deurvezas gantañ koulskoude adober e houlenn, en eur zistaga krenn, ha frêz, ha rust zoken, e heriou: « - Ma-ria Do-naldo...»

Ar Varia a droas he fenn duardez ouz he zad. Hemañ a zelle ouz e votou, evel ma vije bet kant leo euz al lid. Maria, hi, a verzas eur wilhadennig e korn lagad dehou he zad. «- O, ya! aotrou person!»

An dud nevez a reas eun taol lagad an eil d'egile, na tomm na yen, heb eur minc'hoarz. N'eus forz, bez' helled kenderhel gand an overenn.

P'edo an eured o tond er-mêz euz an iliz avad, e kane ar joa e daoulagad an daou bried. « Termaji!» a zistagas unan bennag. Ar friko a oe kaset da benn hervez ar hustumañsou rik. Ha prim goude, an dud nevez a gemere penn hent Roma. Ne oa na bran na koulm en oabl, med heol splann miz mê o tigeri frank war diou galon leun a garantez.

Bremañ e heller displega ar wirionez: an « termaji », ma fell deoh rei dezañ an ano-ze, a oa bet reizet penn-da-benn gand ar gerent, a felle dezo diskouez d'an oll e chome, hervez an istor, Donaldo ha Donati ar pez a oant abaoe ar XIVved kantved, pa zeuas o henda-dou da jom er hornad, goude beza bet soudarded ar Pab, e kompa-

gnunez ar habiten a Gerbriant, en amzer e larer: « E-leh e tremen bannou an heol, e tremen ivez ar Breizad!» Darn a gont - med pe-naoz goud hirio m'ema ganto ar wirionez? - darn a gont e oa Donaldo euz Bro-Leon ha Donati euz Bro-Gerne. Ar gwir anoiou-famill a zo bet kollet, med an anoiou-leh - hag a zalh mad daoust d'an amzer - a zo chomet, kemeret ganto avad eun tammig er ar vro: Cardavido (Kerdauid) ha Carneosto (Kerneost). Eur faltazi ouspenn dindan heol ar Hreisteiz?... Mibiliachou!...

Abaoe m'ema Faro II ha Fri-du II o ren war jas Cardavido ne vez ken plom o tond da vruzuna stalafiou an Donaldo pe an Donati. Ar hontol eo: en em glevad a ra an toer hag ar mañsoner evid sevel tier.

«- Ha kenwerz ar sigaret amerikan?»

«- Me, ma faotr, ne don ket euz ar vorh-mañ... Ha pa vefen bet o chom enni e-pad kant vloaz, ne gontfen ket deoh an disterra euz ar pez a hellfen goud diwar-benn traou ha ne vefe ket mad deoh anaoud. Bezom ha mud, ha dall, ha bouzar! Ha lezom ar chas da redeg. Kenavo! e-giz ma lare gourdadou Donaldo ha Donati.»

Tri bloaz war-lerh an istor gaer-mañ, e oe kavet, war hent Obaldo, eun oto er foz. Enni, Bartolomeo Donaldo ha Giuseppe Donati, maro. E-kichenn, war an ter du, Faro II ha Fri-du II, astennet, goude o chase diweza.

Eun torfed? Gand piou? Perag?... OMERTA = Grik!

Korantin Riou.

Eost 1982.

- (1) En « droidigez », eo bet greet gand rimou ar han italian.
(2) Er vro-ze, an eureud en iliz a dalv ivez da eureud sivil.

R. B. O. :

Hag eo Radio Breiz-Izel ?

A-benn m'en em gavo an niverenn-mañ euz **Brud Nevez** gand ar goumananterien, setu ma vo tri miz leun ma vo bet krouet **R. B. I.** (pe **R. B. O. ouo ouo ouo...** e-giz ma skriv pelloh **Youenn Gwernig**), da skigna heh abadennoù ingal e Breiz-Izel. E peb keñver eo, a gav deom, eun darvoud a-bouez. Ha setu perag on-oa sonjet embann ar miz-mañ eun heuliad a bennadoù diwar-benn ar henta radio o skigna e-pad an deiz on-ije bet biskoaz er vro-mañ.

O ali on-eus goulennet eta digand a beb seurt tud, koulz digand lod a zo oh ober ar radio nevez, pe oh ober war he zro, ha digand selaouerien. M'on-eus bet respontchou hag a vo lennet pelloh digand ar zelaouerien on-oa greet goulennou outo, kerkoulz deom notenni dioustu n'on-eus bet hini ebed (1) na digand an ao. **René Abjean**, rener **R. B. I.**, na digand ar vrezonegerien a zo o labourad gantañ, pe kazetennerien, pe animatourien int. Piou oar? Marteze n'eo ket bet lezet ar re-mañ da respont, pe n'o-deus ket bet a amzer, netra ken?

Ne gomprenom ket avad n'on-nije bet respont ebed digand **Rener R. B. I.** e-unan. Kaset on-oa dezañ eur roll goulennou, ha talvouduz e vije bet sur mad da lennerien **Vrud Nevez** ha d'an oll kleved disklêriaduriou digantañ. C'hoant on-oa da skwer, da houzoud ha tu a oa d'ober eur gont kenta euz al labour bet greet e tri miz gand **R. B. I.**, peseurt gonid a oa e-keñver a-raog, peseurt skoillou a oa beteg-henn. Karet on-ije bet kleved dre just digand an ao. **Abjean**

pegement a vrezoneg a vez skignet war **R. B. I.**, ha kaoz a zo, pe n'eus ket, da astenn an abadennoù brezoneg. Pe c'hoaz, ha peadra he-deus ar radio nevez da zikour ar grouerien hag an arzourien. Berr-ha-berr, c'hoant on-oa da houzoud hag eo **R. B. I.**, diouz soñj he rener, ar radio on-eus ezomm anezi e Breiz-Izel, kaer he-deus beza eur radio a gompagnunez beteg-vremañ.

Pa n'on-eus bet respont ebed d'ar goulennou-ze - ha kerse eo ganeom - ar pez a vo kavet amañ pelloh, eo eta aliou selaouerien. A-raog avad, e karfem notenni eun nebeud traou dindan stumm evezadennoù:

- Perziou mad he-deus **R. B. I.**, a-dra-zur. 17 eur a abadennoù bemdeiz a vez skignet a-hed an devez, euz 6 eur mintin da 11 eur noz. Abadennoù a beb seurt int, hag a hell beza klevet e Breiz-Izel a-bez. Ar heleier a vez roet deom bremañ e brezoneg a vez kaoz enno euz diavéz Breiz. Skigna a reer abadennoù e brezoneg hag e galleg, « mesk-divesk ». 25 bennag a dud a vicher eo a dle beza o labourad da gas ar radio nevez endro, heb konta ar re a deu, e fin ar zizun dreist-oll, da greñvaad ar skipaill. Sañset, diouz ar pez om deuet a-benn da houzoud, eo gwelloc'h d'ar re-mañ evid na oa a-raog war **FR3 Brest** e-keñver koñtrajou ha gonidegez, med pas marteze e-keñver doareou-labour: n'eus nemed lenn ar pez a skriva **Ouest-France** d'ar 16 a viz here, evid gweled eo krog ar gazetennerien da dermal.

- Daoust d'ar pez a zo bet skrivet ha kontet aliez-tre, ne gredom ket, evid pez a zell ahanom, e vije bet eur zotoni kroui eur radio evel-se evid Breiz-Izel nemetken. Ar pez a vank, beteg-vremañ, se zo anad, eo daremprejou gand Roazon ha gand Breiz-Uhel, hag eur serten kont a abadennoù hag a hellje beza klevet e Breiz a-bez. Tu a oa ivez d'en em zoñjal (ar pez a ra **A. Keravel**, end-eeun, en e bennad) ha dleet e oa sevel ar post nevez e Kemper, ha n'eo ket e Brest. A-benn bremañ eo greet, ha re ziwevad eo da zistrei war ze. Med eur fazi a rafe a-dra-zur **R. B. I.** o chom heb kaoud an disterra studio e Brest.

- Hag eo **R. B. I.** ar radio on-eus ezomm anezi e Breiz-Izel? Lennet e vo pelloh eun nebeud soñjou diwar ze. Ne gav ket deom avad e tleje **R. B. I.** beza hed-a-hed an deiz ar radio a gompagnunez ez eus bet greet anezi. Eur seurt radio a vez c'hoant da glevet a-wechou, med a-wechou all, e vez c'hoant da glevet traou all. Beteg-vremañ eo gwir a-walh ar rebech a zo bet greet da **R. B. I.**

ez eo eur radio evid ar vakañserien. Marteze oa mad se e-pad an hañv, med abaoe fin an hañv, n'eus ket bet a cheñchamañchou er programjou, pe nemeur. Evid ar poent, ne vez ket bepred war **R. B. I.** eur magazin a enklaskou, ha setu koulskoude ar pez a houlenner diouz meur a du. **Ar Falz**, da skwer, eo a houlenn en eur hemenn euz an 20 a viz here (e galleg): *la création d'un magazine d'information et de culture en breton, à une heure de grande écoute, le dimanche matin par exemple.*

N'eo ket a-hend-all en eur ginnig d'ar zelaouerien pellgomz 'pad an deiz da honid ar memez billed da vond da zelaou ar memez kaner er memez gouel, e hellint ober e gwirionez anaoudegez gantañ; n'eo ket er stumm-ze kennebeud (pe: pas er stumm-ze nemeten da vihanna), e vo sikouret evel m'eo dleet ar grouerien hag an arzourien.

– Euz ar brezoneg war **R. B. I.** a rankom komz – evel just. Disklêriom a-raog peb tra on-eus kavet digomprenuz a-walh ar homzou e-neus distaget **R. Abjean**, rener ar radio nevez, e-kreiz an hañv:

* war **Le Peuple Breton**, miz gouere, e oa techet da veska **seve-nadur breizeg** gand **brezoneg**. Ma lavare e vije abadennou brezoneg, e nahe diskuilla pegement, daoust ma hellje an dud a deuje da gomz war ar radio nevez, komz evel a garjent, emezañ, brezoneg pe halleg.

* war **Ouest-France** an 29 a viz gouere, pa houlenne **Daniel Yonnet** digantañ ped eur a vrezonég a skignfe, e responte e oa gwel-loh dezañ ar halite evid ar gont a euriou: *Je refuse d'en faire le calcul, je ne rentrerai pas dans ce petit jeu-là, emezañ.*

Pe ez eo mad dezañ, pe n'eo ket, ni n'hellom ket asanti e vije greet euz afer an abadennou brezoneg eur c'hoari, eur **petit jeu**, en eun doare dismegañsuz kazimant. Arabad rei da gredi e ranker ober abadennou dister adaleg ma reer kalz. Ha ken diêz-se e vije bet ober en eun taol eur bern abadennou e brezoneg penn-da-benn?

Posubl e ve, diouz ma skriv lod euz ar re o-deus respontet deom, n'eo ket mad kaoud re a abadennou brezoneg re vuan. A dle beza gwir. Med rêzon e-neus **A. Keravel** (ha **J.Y. Cozan** ivez) pa skriv e rank beza sevenet ar hontrad a zo etre departamant Penn-ar-

Bed ha **R. B. I.** Pemp eur hanter a vrezonég bemdeiz (kement ha beb sizun a-raog) a dleem kaoud. Pemp eur hanter a dleom kaoud. Djwar 17 eur bemdeiz, n'eo ket re, evelato.

Evel just, e vije bet red, evid se, kemer azaleg ar penn kenta muioh a vrezonégérien da labourad e **R. B. I.** Hag o-dije bet gelllet ivez ober abadennou galleg. Med pa n'eus nemed 4 brezoneger (2 gazetenner ha 2 animatour) diwar 16 komzer, ne weler ket penaoz e vo astennet lodenn ar brezoneg. Ha n'o-deus ket dija ar vrezonégérien re a abadennou d'ober (2 eur bemdeiz) e-keñver ar pez a hellfent ober? Penaoz e hello an dud komz diouz ma karfent brezoneg pe halleg (cf. komzou an ao. Abjean supra) ma n'eus ket a vrezonégérien da zigemer anezou ha da gomz ganto? Penaoz 'ta neuze e vo greet da jeñch an traou, hag a-benn pegoulz?

Keit ha ma ne vo ket muioh a vrezonég war **R. B. O./I.** e vo diêz dezi moarvad beza **Radio Breiz-Izel** da vad. Traou all a vefe ivez da wellaad, evel on-eus merket uhelloh. Med se da genta. Ha buan.

Setu eta ar goulennoù on-oua greet ouz eun nebeud tud:

– *Ha selaou a rit R. B. O.? Pehini eo ho sañtimant?*
– *Petra a zoñjit euz danvez an abadennou a vez kinniget deoh? Evid pez a zell ar heleier, hag evid pez a zell an abadennou all?*
– *Hag a-walh a vrezonég a vez klevet war R. B. O.?*
– *Petra a zoñjit euz ar meskaj a reer a-wechou, brezoneg ha galleg er memez abadenn, a-wechou gand ar memez animatour?*

– *Hag a-du e vefe gand muioh a abadennou e brezoneg penn-da-benn? Komzet e-noa ar Huzul Jeneral euz 5 eur hanter a vrezonég bemdeiz...*

– *Kaoud a ra deoh he-deus R. B. O. ar peadra red (e-keñver tud hag e-keñver budjed) d'ober eur radio evid Breiz-Izel?*

– *Lavared a reer euz R. B. O. eo eur radio a gompagnunez (radio d'accompagnement). Kaoud a ra deoh eo ar radio on-eus ezomm anezi e Breiz-Izel? Ma n'eo ket, petra a vije da jeñch?*

Lennet e vo bremañ responchou **Reun ar Rest, Youenn Gwernig, J.Y. Cozan, Y.B. Thomin, A. Keravel** ha **Charlez ar Gall**.

Ma zo lod euz ol lennerien hag a garfe d'o zro disklêria o zanti-
mant, e hellont bepred, evel just, skriva deom.

Skipaill **BRUD NEVEZ.**

(1) Beteg-vremañ. Ma'z erru eur respont bennag diwezatoñ, e vo
moulet en niverenn a zeu.

J.Y. Cozan

A-du gand 5 eur hanter

- Ya, selaou a ran **R. B. O.**
- Soñjal a ra din ez eo mad.
- Da veza kresket ema an abadennoù keleier. Da veza dalhet ema
ar re all.
- Red eo en em gaoud da 5 eur hanter a vrezoneg bemdeiz, evel
m'eo bet goulennet gand ar **Huzul Jeneral.**
- Eun dra vad eo kaoud abadennoù e diou yez.
- N'he-deus ket **R. B. O.** ar peadra a-wal a dud hag a arhant da
veza e gwirionez radio Breiz-Izel, red eo kaoud muioc'h a dud hag a
arhant.
- Evid ar miziou da zond, e hetan da **R. B. O.** kaoud muioc'h a bea-
dra, ha muioc'h a geleier.

J.Y. Cozan,
Eil-Prezidant Kuzul Penn-ar-Béd.

Troet gand skipaill Brud Nevez.

Youenn Gwernig

Nann d'an huñvreou droch

Setu 'ta ar respont am-eus prômetet dit diwar-benn **R. B. O. ouo-
ouo-ouo...**(1)

- 1) Da genta toud, n'on ket eur « selaouer », da lared eo n'on ket
bet morse stummet da chom 'n istribill ouz chadenn radio ebed:
hanter re a drouz ez eus gand n'eus forz pehini. Med selaou a ran
R. B. O. koulz lared bemdeiz, a vare da vare.
- 2) Evid ar heleier, evel just, hag abadennoù zo.
- 3) Memez ma vefe **R. B. O.** oll e brezoneg ne zelaoufen ket muioc'h,
dre ma n'on ket eur « selaouer » e gwirionez.
- 4) Evid pezh a zell ouz ar « meskaj », brezoneg ha galleg, n'am-eus
klevet netra all ebed tro-war-dro e Breiz dibaoe oan bet ganet,
setu, perag ne vefe ket implijet ar meskaj-ze er skingomz?
- 5) N'on ket a-eneb eur radio e brezoneg penn-da-benn, ha n'on ket
a-eneb ober gand ar brezoneg e peb keñver en or Bro, dre ma
n'hell ket eun dluzenn boud a-eneb dour ar stêr. Med, ha tu zo
d'ober kement-se?
- 6-7) Kudenn an arhant da genta, evel just, med kudennou all ivez.
Ha prest e vefe ar Vretoned da gaoud o radio-tele dezo o-unan?
Votet zo bet eul lezenn (lennit ar « Journal Officiel », 30/7/82)
a lez ar « rejionou » lib da zibab, sañset. Deom da hoari. Med kaoud
fiziañs er Vretoned evid o amzer da zond a zo eun huñvre droch,
moarvad. Setu, bevet **R. B. O. ouo-ouo-ouo...**

(1) doare-skriva ganeom.

Y. G.

Reun ar Rest

Eun digoradur war eur bed all.

1) Ya, selaou a ran **R. B. O.** aliez... atao a vije reisoh, med e-giz eun dra nevez n'on ket sur e plijo din kemend all. Dre vraz on kontant euz pezh a vez kinniget. Koulskoude ma zo ezomm da gaoud eun tammig euz peb seurt evid kontanti pep hini, red eo lared n'eo ket êz.

Dre ma zoñj, eun dra vad eo lakaad an diou yez assemblez, evid boaza an dud « en douceur », eun espez digoradur war eur béd all evid kalz brezonegerien dister.

2) Ar heleier a zo re verr e brezoneg, ne dalvez tamm ebed pezh a oa a-raog war radio Brest. An abadennoù all – 16eur-17 eur – zo mad med an eur n'eo ket. E galleg pezh a blij din eo 10 eur-11 eur (La couleur du temps), ivez **A. Marine** gand eun den bennag. Tenna a ra, 'gred din, mod **Radioscope Chance!**

3) Evid an amzer-vremañ, zo a-walh brezoneg, zoñj din, evid an euriou. Med ma vez muioh, evidon e vo mad sur, med evid ar re a n'ouzont ket brezoneg n'eo ket memestra sur a-walh. Aon am-eus ivez eur sort « rejet » diwar-benn R. B. O. oll, setu eo gwelloc'h mond goustadig war ar poent-ze.

4) Evid ar re a oar an daou langaj, an abadennoù-ze a zo mad-tre. An dra-ze eo ma zoñj! **Remi Derrien** zo kalz poblekoh evid a-raog pa veze eñ oh ober abadennoù brezoneg penn-da-benn. An ton farsuz a ya mad-tre, evidon a laran. An hent-se eo red heulia: ar brezoneg n'eo ket eun dra da lakaad en eur ghetto.

An abadenn **Mar plij** zo re verr, ha re a vuzik a vez e-barz; evid 30 mn a-wechou zo eun hanter muzik, med an doare zo mad.

D'ar zul noz siwaz pouez-mouez **Sylvain Kernoa** zo eun handi-cap evidon, beteg-henn n'on ket « satisfait », daoust da veskaj ha da volonteze vad an animatourien.

5) Traou a-walh a zo evid bremañ, gwelloc'h eo gwellaad an traou.

6) Peseurt budjed a rankfe kaoud **R. B. O.**? N'on ket barreg war an afer. An dra-ze n'ouzont ket.

7) Kaoud a ra din, med n'am-eus ket kriteriou all, eo mad an traou evid an amzer-vremañ. Goude-ze marteze e vo moyenn da vond pelloc'h.

Eun dra koulskoude zo drol a-walh: n'eus ket tamm kentel vrezoneg ebed. Evidon e vefe mad kaoud kenteliou, e-pad an devez, ha diouz an noz ivez. Sur e vefe moyenn da gaoud deg munut (bemez marteze zo re, med diou wech ar zizun a vefe deread.)

R. ar R.

Y.B. Thomin

Keleier re zister

Ne hellan selaou **R. B. O.** nemed diouz ar mintin, etre 7e45 hag 8e15, war ar zizun, ha diouz ar pardaez, adal 18e. Daoust dezi beza berrig ha skort a-walh war poentou zo, eo prizet ganen ar seurt radio-ze.

Ar pezh a gavan an disterra enni, ar heleier an hini eo, koulz e brezoneg hag e galleg, daoust m'eo bet gwellaet an traou ganto ar zizuniou diweza-mañ. Kaoud a ra din ne vez ket « goloet » ledan ha klok a-walh, evel ma lavarer e galleg, nevezintiou ar vro. Re verr ar pennadoù-amzer a vez implijet evid ar heleier en or yez, setu ma rank ar gelaouennerien chom heb komz euz darvoudou zo. Hag e rankont, ouspenn-ze, dibuna anezo d'ar haloup evel ma tenn eur vindrailleze.

Evid ar peurrest euz an abadennoù, seblantout a ra din ez eo ingalet madig a-walh an danvez anezo, ar pezh n'eo ket lavared e kavan mad-dreist peb tra enno. Keuz am-eus evelato ne vefe ket,

war ar zizun, abadennoù diouz an noz e brezoneg pe diwar-benn kultur Breiz. Mankoud a ree ivez, beteg nevez zo, d'ar zul vintin, ha daoust ma 'z eus bet greet eur strivadenn, berrig e kavan dalhmad an traou, war ar poent-se.

Eun tamm muioc'h a vrezoneg a vefe mad, bremañ, nemed e kav din 'z eus bet greet eur hammed war-raog e-keñver ar pez a veze kentoh. Red eo avad mond-tre beteg ar 5 eurvez hanter prometet dre skrid.

War a credan. menoz an abadennoù diouyezeg – hag e oan klouar-kenañ outo kentoh – a ziskouez beza mad, goude beza implijet. Peb tra, gwir eo, a zo hervez an animatour. Reou zo a oar en em ziluzia mad, da skwer **Remi Derrien**, **B. Killeñ**, ha reou all nebeutoc'h. Ha da zarn zo beza brezonegerien, n'eo ket tra-walh. N'int ket aotreet d'ober forz petra.

Y.B.T.
Troet gand A.K.

A. Keravel

Pell euz ar gont

Da hortoz dispaka eun ali ha menozioù hirroc'h, setu amañ ar respontoù d'ho koulennou.

1) Evel kalz tud, deuz ar mintin eo e selaouan kentoh ouz abadennoù **R. B. O.** Goude nav eur e vez hervez va labour, a vare da vare, da houd petra emañ o kas war ar gwagennoù. Mesket-tre eo va zammig barnadenn, a-hend-all, evel a weloh.

2) **Ar heleier e brezoneg**: kalz re verr ez int! daoust ma vez an trohadou keleier-niverusoh (5 anezo ma ne fazian ket), nebeutoc'h a amzer a ya ganto evid a-raog **R. B. O.**: etre 12 ha 15 munutenn bemdez, e-leh 20 munutenn, evel ma oa abaoe bloavezioù... hag an oll ahanom o klemm, neuze, pa ne oant ket eun tamm hirroc'h! Ha netra en tu all da 18e15 evid ar heleier e brezoneg, da lavared eo d'an « eurvezioù mad ».

An abadennoù all e brezoneg? Eun dra gaer, a-dra-zur, eo geloud klevet komz diwar-benn a beb seurt sujedou en or yez, ouspenn ar heleier, e-pad abadennoù **Remi Derrien** ha **Rozenn Milin**. Gourhemennou a zo dleet dezo, dre ma'z eo ken disheñvel ha ken plijuz war eun dro koulz ar sujedou dibabet ganto hag an dud lakaet da gomz, e brezoneg reiz ha saouruz evid ar peurliesia a-hed o eurvezioù a « vuhezegez » pe « animasion »...

Greet 'z eus bet kaoz evel-se, e abadennoù **Rozenn**, gand brezonegerien zisparr, anezo aliez stourmerien evid pal pe bal. Diouz e du, **Remi** e-neus gouezet lakaad da gomz e-leiz a dud 'barz ruiou Kemper war sujedou fentuz pe euz ar vuhez pemdez. Hervez a glever, hag hervez a lavaront o-eun, n'emaint ket war-bouez kaoud diouer a zanvez nag a vrezonegerien barreg-tre!

Mankoud a ra, avad, **kronikennou berr**, hag a vefe klevet da eurvezioù resiz, dalhmad ar memez re: diwar-benn kudennoù ekonomiezh ha sosial, – an embannadurioù nevez hag ar vuhez kulturel (ne vefe ket hepken dispaka lehiou hag eurvezioù ar festou-noz) – al labour-douar, hag all... Teir abadenning a bemp munutenn a vefe mad-tre bemdez da ober, gand eun devez merket evid peb « sujed braz », beb sizun.

3) **Ar brezoneg war R. B. O.**: Ne gav ket din e vefe hir a-walh an amzer gouestlet d'ar brezoneg war **R. B. O.**. Pell emañ moarvad, ha ni d'an trede miz ma labour ar post nevez, da helloud konta 5 eurvez hanter a vrezoneg bemdez, ha pa vefe lakeet 'barz ar gont ar pladennoù kanet ha komzet e brezoneg, ouspenn an divizou, ar heleier hag an « titrou » distaget en or yez. Red e vefe ingala gwelloc'h an traou evid ar brezoneg, hervez m'eo bet **gouestlet** e-barz an « emgleo » (eur gwir gontrad e gwirionez) bet divizet etre **Radio-France** ha **Kuzul Penn-ar-Béd**. Pell e kinnigan eun « daolenn amzer » reish evid an hini a reer bremañ ganti, eun daolenn oc'h ober teir lodenn evid ar **heleier**, an **diskou**, ar **hronikennou**.

Eur radio sotaad?

4) Diwar-benn implij an diou yez mesk-ha-mesk. Evid ar mare ha kuit din da zerhel kont euz abegou ha barnedigez an dud a-du pe a-eneb « meskaj » an diou yez, kredi a ra din an doare-ze da implij tro-ha-tro ar galleg hag ar brezoneg a dle **ober vad da yez Vreiz**. Hervez ma lavar ar re a labour e brezoneg e **R. B. O.**, kouls ha diouz klevet niver ar zelaouerien o telefoni evid tra-pe-dra, setu ma vez dizoloet gand kalz euz or henvroiz e komprenont pe a vez displeget en or yez, ha kalzig brezonegerien ez eus, hervez, hag o-deus bet tro da gas kelou pe da houlen diskliêriaduriou. Hag, evel boaz, n'eo niver ar re a vez o rei da anaoud o zoñj nemed ar gantvedenn pe vuioh euz ar re a gav plijadur gand kement a glevont e brezoneg war o fost... N'ouzon ket ha tud a vefe hag o-defe roet da houd emaint a-eneb implij ar brezoneg war gwagennou ar radio!

Dao din lavared evelato e kavan displijuz-tre klevet **kinnig e brezoneg** diskou e galleg, sañset « fentuz » evel diotachereziou Coluche pe eun all eveltañ...

Ar pe a gavan an displijusa eo « live » kalzig euz ar pladennou a lavared ez int « sonerez » pe « kanaouennou » hag a vez skinet gand **R. B. O.**, dreist-oll e-pad an endervez hag ar pardaez, ken fall, ken divalo ha war an darnvuia euz postou all **Radio-France** pe ar radioiou « libr ». Evel meur ha meur a hini, mond a ran buan skuiz gand klevet youhadennou, moueziou raouliet, breugadennou ha gwihadennou e saozneg hag e yez Pigalle, hag e troan ar bon-ton... Eurvezioz zo hag e talv ar « radio a gompagnunez » kement ha « radio-sotaad » pe « radio-diotaad »! Kompren a ran ne heller ket lakaad **R. B. O.** da skigna tra ken nemed sonerez ha kanaouennou klasel pe soniou brezoneg ha keltieg, gand divizou skiantel pe deskadurez etre diou zonatenn pe diou werz euz ar vro... Evelato, henn adlavared a ran, gwelloh eo chom heb rankoud klevet kanaouennou hudur pe zod penn-da-benn... N'eo ket red d'ar Vretoned gouzañv eur seurt meskacherez evid kaoud ar blijadur da zelaou or yez a vare da vare!

5) Respontet em-eus amañ uhelloh d'ar poent-ze euz ho koulennou ha kinnig a ran pelloh va zammig taolenn...

Seveni an emgleo sinet.

6) Penaoz e ouifem hag he-deus **R. B. O.** peadra da zeveni kement a dlefe ober eur radio o labourad evid Breiz-Izel en he fez? N'ana-vezom na niver an dud a ra war he zro, nag ar budjed a vez roet gand **Radio-France** d'he fost a Gemper. Dleet e vefe dezi moarvad kaoud eur skipaill kelaouennerien hag animatourien vrezoneg brasoh o niver, m'o-defe muiohig a amzer d'aoz o frogamou, hag int barreg mad war ar yez, evel ar re a glevom peurliesia hag evel ma oa ar re a veze oh ober war-dro abadennoù Brest, kent miz eost. (1) Evid ar budjed, ar brud a zo n'eo ket bet espernet an arhant evid stalia ar post nevez... pa veze, beteg miz eost, ken paourig an traou a-berz **FR3** evid he studio a Vrest...

7) Lavaret em-eus bremaig pe a zoñjan euz ar « radio a gompagnunez » en doare ma vez, da eurvezioz zo, war **R. B. O.**... Daoust hag e chomo radio ar Servij boutin evel m'emañ bremañ en or bro, penaoz goud? Bez' e vo moarvad hervez ar pe a vo divizet gand ar **Gevredigez-Radio** a vo da groui dre amañ, hervez al lezenn nevez, — piou oar pe da vare avad: ar bloaz a zeu, pe diwezatoh?... Hag hervez ma vez taolet evez pe ket ouz ali ar Vretoned gand **Radio-France**, gand ar **Gevredigez** nevez... hag e diabarz ar **Huzul-alia** da veza savet, mar bez savet!

(1) Gwelloh a rafe brezonegerien zo, forz pegen emroüz int en o stourm evid ar yez, nemed ez eo galleg o distagadur pe o stumm sevel frazennoù brezoneg, gwelloh e vefe dezo chom heb dond dirag eur mikro radio: droug eo a reont, siwaz d'o bolontez vad, ha n'eo ket rei skoazell d'o yez muia-karet!...

Setu eur steuenn pe raktres-dre-vraz a ginnigan evid al lodenn brezoneg e taolenn bemdezieg abadennoù **R. B. O.**:

1) **Ar 5 eurvez hanter** merket en emgleo **Radio-France** ha **Kuzul Penn-ar-Béd** a die beza sevenet, an diviz-se o veza diazez ar skoazell 500 000 lur profet gand an departamant da Radio-France evid R. B. O..

2) Tri rumm abadennoù a zo d'ober:

(a) ar **heleier** e brezoneg;

(b) an **divizou** etre an animatour hag an dud bet galvet gantañ, o disklêriaduriou hag an **diskou-kanaouennoù** e brezoneg etre diou gaoz (an diskou-sonerez, ha pa vefent sonerez breizeg pe geltieg, o chom e diavêz ar gont amzer-mañ).

(c) ar **hronikennou** berr e brezoneg.

3) Setu penaoz e hellfe beza ingalet an trohadennoù (pe sekañsou) evid peb rummad (e munutennoù):

Mintinvez	Endervez			Pardaez						
	a	b		a	b	c	a	b	c	
6e-7e	5	15	12e-13e	10	10	5	18e-19e	5	15	5
7e-8e	10	15	13e-14e		20		19e-20e		15	
8e-9e	10	15	14e-15e	5	20		20e-21e	5	15	
9e-10e		20	15e-16e		20		21e-22e		15	
10e-11e			16e-17e		15		22e-23e	5	15	5
11e-12e		20	17e-18e		15					

Bez' e vefe evel-se evid ar brezoneg:

- 55 munutenn evid ar heleier;
- 260 mn = 4 eur 15 evid an divizou hag an diskou;
- 15 mn evid ar hronikennou berr.

An ingala-ze ne vefe nemed eun **daolenn dre vraz**: deveziou zo e pado hirroh divizou an animatourien hag an diskou kanet e brezoneg, kuit da veza berrohig an deiz war-lerh. Amzer ar heleier hag ar hronikennou avad a dlefe chom **ingal bemdez**, war-bouez nebeud.

Hag ar radio e Brest?

Da gloza, daou dra a garfen lavared, e diavêz d'ho koulennou:

A- D'am zoñj, eur gwall daol an hini he-deus bet **Radio-France** prientet abaoe daou vloaz dija hag a zo bet sevenet a-benn bremañ **gand moug ar Radio a Zervij Boutin e Kêr-Vrest**, evid kroui eur Radio all e Kemper. Gwall a ze pa'z eus roet 17 eurvez emren d'ar post nevez... pa n'o-doa en oll abadennoù **Radio-Armorique** nemed 4 eurvez emren (lodennig-amzer Brest o veza e-barz ar gont-se). Ne oa ket red avad, evid lakaad en e zao ar post nevez paouez gand rei da gleved **Radio-Armorique** war douarou Kornog Breiz. Pez a vije bet d'ober eo rei o emren ivez e-pad eun toullad eurveziou bemdez d'an abadennoù e brezoneg hag e galleg aozet e Brest ha da veza skinet dre ar gwagennoù-krenn (Kimerh) ha war daou euz an hirderiou gwagennoù F.M. implijet bremañ gand **R. B. O.** Ne vefe tamm ebed re evid eun dachennad ehon-mad evel Breiz-Izel kaoud daou bost braz a radio boutin (evid **ouspenn eur milion hanter a dud**).

Siwaz, ar mennad bet ijinet, bloaveziou zo moarvad, dindan ar gouarnamant Barre, gand pennoù **Radio-France** (brezel yud d'ar mare-ze etrezo ha renerien **FR3**), a zo bet sevenet bremañ dindan ar gouarnamant nevez... gand ar memez tud, tost da vad... Ne yan ket pelloh gand ar gudenn hagn-ze. Kredi a ran e tlefe eun toulladig tud prederia asamblez eun devez penn-da-benn, o lakaad a-gevred o menozioù diwar-benn stumm ha frammou (strukturiou) ar radio e Breiz, e-sell termeni pe blas e tlefe beza hini or yez er skingasadennou. Hag ober kemend-all evid an tele, gand derhel kont euz ar stummoù nevez a vo implijet er bloaveziou kenta da zond...

B- Merzet mad e vez gand **R. B. O.** e rank kaoud eun troad da nebeuta e Brest, brasa kêr Breiz-Izel. **Radio-France**, hag a ren bremañ war gement tra o tenna da **Radio ar Zervij boutin**, he-deus lakeet kloza, diwar penn kenta miz eost, an abadennoù brezoneg a veze aozet e Brest abaoe eun ugent vloaz bennag. Hag a-benn ar 1a a vije genver e vo klozet ivez aoza an dister a aba-

dennoù e galleg bet dalhet d'o zevel er gêr-ze, hag a vez skinet war gwagennoù-etre Kimerh. Hiviziken, ne vo ken nemed skingasadennoù **R. B. O.** o tond euz Kemper ha skinet gand ar renkenad emetourien o labourad war an F.M., e Tredudon, e Kemper, Kemperle, Brest ha Pempoull, hag ouspenn war O.M.

Nemed ne hell ket **R. B. O.** tremen heb kaoud, da nebeuta, keleier war-eeun euz eur gêr a zo e penn eur hornad a 400 000 den bennag. Abaoe miz eost e rank kelaouennerien **R. B. O.** labourad dre an telefon evid pezh a zell kornad Penn-ar-Béd an Nord pe, a-wechou, mond di ha distrei buan-ha-buan da Gemper. N'hell ket **R. B. O.** padoud o hoari evel-se, ha setu m'emañ bremañ o houlen e bureo e Brest gand kelaouennerien evid ar galleg ha moarvad ivez evid ar brezoneg! Ha kevezerez ez eus etre **Radio-France-R. B. O.**, mestrez war ar radio, hag **FR3**, mestrez war an tele evid ar « Rannvro »: da behini anezo e vo fiziet ar plas implijet betek-henn gand studio Brest er zavador e-kichen ar PAC?... Red e vo d'an tamm kudenn-ze kaoud he diskoulm a-raog fin ar bloaz-mañ!

A.K.

Charlez ar Gall

Bleo kaz war eon lêz.

Skingasadennoù **Radio Breiz-Izel** a grog abred deuz ar mintin. Pa echuont e vez deut ar mare da vond da gousked. Red mad e vefe, eta, evid galloud barn **R. B. I.** e-keñver peb tra, selaou an oll abadennoù en o hed. Ar pezh ne ran ket: eet eo dreiston an oad da strani gand eun trañzistor ouz va goug ha re abred e vefe din c'hoaz klucha en eur gador-ziskuiz. Pa zigouez ganin digeri ar post bihan war **R. B. I.** eo peurvuia da vare ar heleier (**Keleier Breiz**);

a-wechou ivez evid selaou an den-mañ-den, pa ouezan piou eo ar vaouez pe ar gwaz a dle dond da gomz. Se n'eo ket tra-walh, sklêr eo, evid maga burutellerez klok pe diazeza eur varnedigez a dalvezfe evid **R. B. I.** a-bez. N'eus kennebeud nemed tri miz abaoe m'eo bet krouet ar Greizenn nevez-se. Riskluz e vefe, azaleg bremañ, kinnig komzou peurglozuz diwar-benn al labour greet ganti dindan ken berr amzer hag an doare he-deus da gas an traou endro.

Va zoñj, daoust da ze?

Dister ha strizig e kavan lodenn ar brezoneg war **R. B. I.** Pell emañ deuz an eurvezioù oa bet prometet rei d'or yez ha d'or hultur. N'eo ket eun dra nevez kleved keleier e brezoneg war ar skingomz. Bloavezioù ha bloavezioù a zo abaoe ma skigne **Radio-Arorig abadennoù a seurt-se deuz Brest. Daoust ha muioh a zo anezo war Radio Breiz-Izel?** Ha padoud a rafent hirroh? Kentoh e vefe ar hontrol. Gouzoud a ran ez eus abadennoù all e diavêz « keleier Breiz », brezoneg enno. Na pebez tra gaer! Eur ger brezoneg amañ, eur bomm berr a-hont, eun trohadig etre daou frapad sonerez (brokuz eur gand pladennoù), eul lostad a-gleiz, eul lostadig all a-zehou... **Err-Bé-ooo... aou aou...** etre belbiachou ha raonerez o talvezoud da hounid eun T-shirt pe eun diotach all bennag. Bleo kaz war eon lêz e-nije lavaret va zad-koz! Bezom siriuz. Petra lavarfer deuz eun den hag a hadfe eur banerad patatez (ha pa vefent a ouenn zispar) amañ hag a-hont, strewet e-touez eun deveziad-arad ed? Setu aze, koulskoude, ar pezh a reer gand ar brezoneg war **R. B. O.** Hiniennou zo marteze hag a denn o boued diwar ar meskaj-ze. Gwell a ze evito. Hogen, red eo anzañ emañ pell diouz abadennoù 'zo a veze skignet war **Radio-Arorig**: abadennoù o padoud eun eurvez leun, brezoneg enno penn-da-benn, pinvidig an danvez anezo, frammet a-zoare, turgned brao, reud ha ront, flour evel eur vi.

Arabad kredi e skrivan kement-mañ dre zrougiez. Poan am-befe o houzañ e teufe rener **R. B. O.** e Kemper hag e skouadrenn dud da gredi e kavan abeg e hini pe hini anezo. Tamall anezo a vefe tamall e gaou. N'eo ket int eo, kredi a ran, a zo kirieg. Kabluz nebeutoh c'hoaz. Pell amzer zo e anavezant **Reun Abjean**. Gouzoud a ran ivez eo greduz ar vrezonegerien galvet gantañ evid e skoazella, peseurt barregez eo hini darn anezo, pegen fetiz ar vouedenn dindan kloppenn an oll anezo. N'eo ket aze emañ an dalh.

E-pad pell a-walh em-eus labouret war an dachenn eo o hini hirio evid divinoud war beseurt gwenojenn striz e rankont moarvad derhel o zreid ganto. Ar homzou largentezuz distaget war an ton braz e Kemper d'an 30 a viz gouere gand **Georges Fillioud** ha **Michèle Cotta** pa'z int deut da rei al lañs kenta da **R. B. O.** a oa re ganto blaz ar pilpousez evid va lakaad da zistrei diwar va meno. Diskredig e choman beteg gweled hirroh. Skiant-prenet, c'hwi oar...

Ch. ar G.

Jules Gros

Le Trésor

du

Breton parlé

Le langage figuré

3ème édition

**Studiou brezoneg
Etudes bretonnes**

**Emgleo Breiz – Gwalarn
Brud Nevez**

Priz: 20 lur (350g)

Eur zoñj all diwar-benn:

Ar Spontuz Circus

Eur pez gand meur a zor

E niverenn 56 Brud Nevez, on-eus embannet daou renta-kont diwar-benn pez-c'hoari nevez Strollad ar Vro-Pagan: ar Spontuz Circus, unan diwar bluenn P.M. Mevel, egile diwar hini J. Salaun. Digemeret on-eus abaoe al lizer hir-mañ hag ah embannom gand plijadur. (An doare-skriva hag an titlou ganeom.)

Plijuz e vez d'an hini ra eun dra bennag gelloud klevet pe lenn ar pez a zoñj ar re all diwar-benn an dra-ze. Plijuz eta pennadou P.M. Mevel ha J. Salaun diwar-benn ar **Spontuz Circus**. Plijusoh a ze dre m'oa ar wech kenta din lenn eun dra bennag e **Brud Nevez** diwar-benn **Ar Vro-Bagan**.

Dihouzañvuz, eme Jakez Salaun. Da lavared eo « insupportable » e galleg! « Gros » 'm-eus kavet ar varnadenn, med gand neud-seiz pe kanab stoupog, pep hini a rank gwriad e venoziou gand ar pez vez en e gerz.

*Ar pez a zo iskiñ eo an doare ma teu a-benn ar Vro-Bagan da veza digemeret dre gement leh ma teu. « Souezuz, sebezuz » a ranker kompren ar ger iskiñ, poseve, yan 'tao! Peogwir e plij ar chifrou hag ar statistikou da Jakez Salaun, ez an da rei dezañ: 20 gwech eo bet c'hoariet ar **Spontuz Circus** abaoe fin miz meur, hag 20 gwech all e vezo c'hoariet ahann da viz meur a zeu. Soñj on-eus e ginnig da FR3 goude-ze. Ouspenn 5 000 a dud o-deus gwelet ar pez beteg-henn, ar pez a ra ouspenn 250 a dud bewech, ar pez a zo kalz evid ar c'hoariva. Red eo gouzoud ivez ez eus bet c'hoariet 7 pez-c'hoari nevez all gand **Ar Vro-Bagan** abaoe Nedeleg 81:*

- **Krouidigez ar vaouez** hag **Ar Psikolog**, skrivet gant **P.M. Mevel** ha **Naig Rozmor**, ha bet embannet gant **Brud Nevez**.
- **Lina** hag **An tan e ti Kemaspreden**, skrivet gant **Roparz Hemon**.
- **Dañs an aour**, **Ar Boueta koko**, kempennet gant **G. Kervella** diwar peziou-c'hoari pobleg an 19^{ved} kantved.
- ha **Torfed ar breur Juniper**, skrivet gant **Gheon** ha troet e brezoneg gant **Jakez Riou (Skridoù Breizh)**.

C'hoariet int bet dre ar vro hag e vint c'hoaz. Muioh a labour a vo greet c'hoaz diwar-vremañ rag daou zen a vicher a vezo er strollad azaleg miz here. Kement-mañ evid diskouez eo tohor ar c'hoariva brezoneg!

Re hir eo an arvestou a-wechou. A-wechou eo bet gwir, hag e Gwengamp dreist-oll: eur hastad traou a-raog ar pezh, diwezad o krog dre ze, re vraz ar zal, re a dud, fall ar zon, tomm an amzer. A-walh eo ar **Spontuz Circus** djoutañ e-unan evid boueta eun abadenn. Fazi eo bet e lakaad asamblez gant traou all. Salv ma teufe **J.S.** adarre da zelled outañ e-giz m'e-neus **P. M. Mevel** greet.

Unan euz lezennou ar c'hoariva (ma'z eus anezo!) eo, a gav din, ne dleer ket ober diou wech gant ar memes doareou. 'Ta, **J.S.** eet da **lezenner!** Euruzamant evitañ, eh en em houlen ha lezennou 'z p. Na pa vije lezennou, ne vez ket red mond d'o heul na senti outo. Ar re o-deus kaset ar c'hoariva war-raog eo ar re o-deus en em zistrobet diouz al lezennou-ze.

Abeg a gemer **J.S.** er hantik kanet gant an oll er zal hag er gestenn greet e-touez an dud - abalamour int bet implijet e **Buhez Mikèl** ivez. Kestennou a vez greet en ilizou hag er sirkou. Red e oa deom diskouez doareou ar sirkou a zach war arhant an dud. Hag ouspenn, setu lakaet ar Relijion Galtolik e kemm gant ar sirkou! Ar peziou divergont alato!

Brasa plijadur on-nevez-ni eo gweled an oll o sevel (nemed unan bennag e-giz **J.S.**) da gana a-unan hag a-greiz kalon *Da feiz on tadou-koz* hag eur banerad peziou arhant bewech. 'Ta hag a ziskouez eo mad an doareou implijet!

Pe sirk, pe c'hoariva? Nag an eil nag egile, 'm-eus aon! Arabad kaoud aon: ni n'on-eus ket! Eur menoz striz, a hiz koz, e-neus **J.S.** diwar-benn ar c'hoariva. Chomet eo kalz war-lerh endra ma yee ar c'hoariva war-raog. N'eo ket din d'ober skol dezañ: leoriou 'zo diwar-benn istor ar c'hoariva ha red digeri an daoulagad war ar bed endro deom. Meur a zoare a hoariva a zo. Jakez Salaun a hell nah rei an ano a hoariva dezo; ne reont ket foultre kaer moarvad.

Eun abadenn, eur « spectacle » eo. Sirk, pe c'hoariva a zo abadennoù, « des

spectacles ». Red e vez da **J.S.** klask gerioù galleg evid lakaad anioù d'ar pezh a ra *Ar Vro-Bagan*: c'hoariva *parachutet, chanter, spectacle*.

Dielfennet e-neus kalz a draou munud, heb beza deuet a-benn d'o hompren. Ha padal, ne vanke ket kalz a dra dezañ evid o hompren, ma karfe beza klasket eun tammig, rag *an hini a glask a gav*, skrivet eo en *Aviel*. Setu tri dra, da skwer:

1) *Dister eo ar c'hoariva e-keñver ar sirk!* Just a-walh! Dister eo ar strollad kenta e-keñver ar sirk braz. Dister eo buhez ar houliou er sirk e-keñver an abadenn sirk dirag an dud. Ze on-eus bet c'hoant diskouez.

2) *Vefa Gwenegan n'he-deus ket kavet nag an ton nag ar stumm.* Just a-walh! Ar pennou braz o-deus roet eur galloud dister d'ar re vihan, hag ar re-mañ ne ouzont ket dioutañ. N'int ket ker barreg hag ar re vraz d'en em ziskouez dirag an dud. Se on-eus bet c'hoant diskouez.

3) *Braz a-walh eo an dud evid ma ne vije ket red diskuilla dezo ar B.A. Ba euz peb tra!* *Demokratika sirk ar bed!* Poueza a ra ar sirk braz war ar galloud e-neus roet d'ar strollad bihan. Red eo e vefe heuet an dud er zal gant an doare *demagogiez*-se, evid ma kemerfent droug ouz ar pennou braz. Rag ouspenn kompren, e rank santimanchoù diwan e-touez an dud. **J.S.** a zo bet displijet: mad eo! An dra-ze on-eus klasket diskouez.

Troetoh eo **J.S.** da varn ar munudou eged an traou dre vraz. N'eo ket ledan a-walh e zellou war ar pezh a-bez, setu perag moarvad n'eo ket deuet a-benn d'e gompren mad. Red eo anzañ ne vez ket êz da entent dioustu d'an oll: pep hini a gemer ennañ ar pezh a gar: ar menoz gwaskerez, impalaerez; pe nemetken ar *spectacle* tro ma lavar **J.S.**. Meur a zor a zo er pezh, ha meur a alhwez d'o digori. **Mard** eo eet fri **J.S.** da dourta ouz eun nor bennag, eo marteze abalamour n'oa ket lemm a-walh e lagad evid kaoud an alhwez mad.

Goulc'han Kervella,
euz Strollad ar Vro-Bagan.

Eun nebeud eveziadennou all

Daoust ha feuket eo bet **Goulc'hen Kervella**? Ma'z eus bet embannet meur a bez-c'hoari e **Brud Nevez**, eo ar wech kenta, gwir eo, ma'z embannem er gelaouenn eur renta-kont (ha memez daou, kement hag ober...) euz eur pez-c'hoari gand **Strollad ar Vro-Bagan**. Kerkent e talvez deom reseo eur pennad, evid ar wech kenta, digand **Goulc'han Kervella**: eun enor eo deom, ha trugarekaad a reom anezañ evid e zisklêriaduriou prisiuz. Med din e talvez kerkent all paka digantañ eur fustad bazadou druz, heb konta ma'z on lakeet gantañ da veza kazimant dientent ha dall. *Euruzamant evitañ* e skriv eo *moarvad* n'em-eus ket komprenet ar **Spontuz Circus**. N'an ket da dabutal, rag n'eus ket peadra e gwirionez. Hag e hellan ober evelato eun nebeud eveziadennou all?

1) Gwir eo e oa *groz* eun tammig an titl a oa bet lakeet d'am renta-kont. Med rimet mad e oa. Ha greet eo an titlou da zacha evez an danvez-lennerien. Re aliez, just a-walh, ne vezont ket *lipet* a-walh er helaouennou brezoneg, e-keñver ar pez a vezer boazet da lenn e kelaouennou galleg pe zaozneg. War a hañval, eur deuet mad a-benn euz e daol gand hemañ. Med n'eo ket evid se ne ranker ket taoler evez ouz *kement* a vez skrivet er pennad a-bez war-lerh. M'e-nije bet Goulc'han Kervella lennet va fennad penn-da-benn gand daoulagad digor-mad, n'e-nije ket bet dalhet kont hepken euz ar pez a rêen me va-unan anezo dija *eun nebeud munudou* (pajenn 43, linenn 9) ha n'e-nije ket bet ankouaet ar pez a oa a-raog ha war-lerh. Gwelet e-nije bet ne dalvez e gwirionez ar ger *dihouzañvuz* nemed evid al lodenn ziweza euz ar **Spontuz Circus**. Ha pa lavar Kervella e-unan diwar he fenn eo bet savet evid ma *heugfe* an arvestourien, ne welan ket re vad petra e-neus da rebech din.

2) Dister eo da Houlc'han Kervella ober din falz-tamallou war zigarez eun nebeud gerioù galleg e-neus bet tu da bennaoui em fennad, p'e-neus bet ezomm eñ ivez euz ar galleg evid displega ar ger *dihouzañvuz* ha pa ra evel an oll gand *statistikoù, santimanchoù*, hag all... Hag ez eus aze eur gudenn wir? N'eo ket dezañ a-hend-all e teskin e hell ivez ar ger *iskiz* talvezoud kement hag *espar*...

3) Pelloh e ranker evelkent en em houlen ha mad eo sevel eur varnadenn pe eur vurutelladenn diwar-benn eur pez-c'hoari, pe n'eo ket. Ha droed a zo da zisklêria eur zoñj diwarnañ, pe diwar eul leor, eur film... Ha n'eo ket

a-wechou eun dever henn ober. Taoler evez a rankan eo moarvad **Brud Nevez** unan euz ar helaouennou brezoneg nemeto o rei eur plas a-zoare d'ar buruteller ha d'ar *hritik* da varn skridou, pladennou hag all... Sevel eur renta-kont, n'eo ket dispenn eul labour eo, ha mad a-walh e kav din ez anavezan hini ar **Vro-Bagan** evid m'am-bije bet c'hoant d'ober fae warnañ. 'Barz ar gont-se, ne welan ket perag e klask Kervella rei da gredi em-eus barnet anezañ evel unan *tohor*. A-hend-all, ha n'eo ket Roparz Hemon (hag a anavez mad G. Kervella) hag a skrive e 1926 o-doa re aliez ar vrezonegerien *ar pleg fall da veuli ha da ganmeuli kement skrid embannet en (o) yez?*

4) Evidon-me, em-eus displeget toud ar pez a vad a zoñjen euz **Spontuz Circus**. Med c'hoaz eur wech, *ha ne vije ket eur goulenn bennag d'ober?* Prest on d'anzañ n'on ket, a-dra-zur, e-keñver c'hoariva, ken desket ha ken ampart hag ar mestr-leurennier hag ar c'hoarier soutil a zo euz Goulc'han Kervella, med piou a zo? N'em-eus ket e skiant-prenet, med piou e-neus? Ma lavar-eñ eo ar **Spontuz Circus** c'hoariva penn-da-benn, a-benn ar fin, me eo mad din. Med ma lak an arvestourien bewech da gana **Da feiz on tadou-koz** ha ma'z a bewech da gestal en o zouez, ha n'e-neus ket aon da skuiza anezo? N'em-eus ket studiet eveltañ istor ar c'hoariva, gwir eo, med pa'z an da weled eur pez, e plij din beza souezet, gweled ha kleved eun dra bennag a nevez beb taol daoust ma n'on ket bet dizouezet o weled ar **Spontuz Circus**!

A-hend-all, n'eo ket war zigarez ma vefe greet euz ar **Spontuz Circus** eun abadenn (pe eur...*spectacle!*) e vefe disteroh evid se! A beb seurt abadennou a heller da gaoud, hag a heller prizoud e-keñver danvez pe e keñverioù all. Sed en em houlen ha-eñ n'e-neus ket G. Kervella treuz-komprenet ahanon. Displega a rin va zoñj endro eta. Evid ar poent e talhan da zoñjal eo *re hir, kalz re hir* lodenn ziweza ar **Spontuz Circus**. Re astennet eo bet, n'eo ket dastumet a-walh. E vije bet displeget berroh, e vije bet krennet, e vije bet c'hoariet gweloh, ha n'e-nije se e feson ebed miret ouz an arvestorien da veza *heuget*, m'o-doa da veza.

5) N'eus forz penaoz, pa'h on bet pedet da vond, eh in c'hoaz a galon vad, hag incognito evel boaz, da weled ar **Spontuz Circus**, ma 'm-bez tro eur wech bennag. Ha notennet e-noa Goulc'han Kervella em-oa skrivet dija, ar wech all, e oa *sur, eun dra da weled*. Perag ne vije ket eun dra da adweled?

J.S.

Enklaskou

IMPLIJ AR BREZONEG E PLOUVIEN

Dedennuz ha kenteliuz eo a-dra-zur an enklask a zo bet renet e parrez **Plouvien** gand **A.V. Arzur**, kelennerer er skolioù lib, da houzoud ped brezoneger a zo eno, ha petra a zoñjer eno euz ar brezoneg (1). Gwelloc'h eh anavezom evel-se stad ar yez, hag e teu ar studi-mañ da glokad an anaoudeger on-eus dija euz ar gudenn (2).

N'eo ket disi an enklask penn-da-benn koulskoude: re aliez e vez greet labouriou seurt-mañ gand tud o-unan, heb m'o-dije daremprejou gand ar re o-deus bet dija tro da bleustri war seurt danvezioù. Ha kement ha kas da benn eul labour ken hir hag an hini a zo bet greet e Plouvien, ne vije ket bet falloh derhel kont euz serten traou zo. Gwelloc'h e vije bet, da skwer, m'he-dije A.V. Arzur roet deom da anaoud an disklêriadurioù he-deus dastumet ivez diwar-benn ar vicher a ra an dud o-deus respontet d'he goulennou. Mad e vije bet, a-hend-all, goulenn diganto hag-eñ int ginidig euz ar barrez, pe n'int ket, ha zoken peleh e labouront.

N'eo ket reziz a-walh an oll houlennoù bepred: « kana » ha « kleved kana » n'eo ket ar memez tra, ha pa lakaer anezo o-daou dindan ar memez goulenn, n'heller ket ober an diforh etrezo; brezonegerien a hell ober plijadur dezo « kana », koulz ha ma hell ober kement a blijadur da nann-vrezonegerien « kleved kana ». Traou all a vānk: kement ha beza bet goulennet digand an dud ha lenn a reont brezoneg, e vije bet mad goulenn c'hoaz diganto ha skriva a reont ivez.

Kement-mañ ne vir ket – tamm ebed – en-dije an enklask renet gand A.V. Arzur eun dalvoudeger vraz, rag kaset he-deus he studi dre ar munud. Ha ma n'eo ket ar wech kenta e rener seurt enklaskou, e tle beza evelkent unan euz ar studiadennoù kenta o klask displega e peseurt digouezioù e komzer brezoneg, piou a ra, hag all...

En oll, eo 907 a dud eo o-deus roet o respont. Eun niver braz eo, war-dro eun drederenn euz re Plouvien, hag a zo anezo 2500 etre toud. Ouspenn 18 vloaz eo an oll re o-deus kemeret perz en enklask. Ne skriv ket kennebeud A.V. Arzur – hag a-bouez eo kement-mañ ivez – ha klasket ez eus bet lakaad oll dud ar barrez da respont, pe hepken an 907 hag o-deus greet e gwirionez: diouz ma'z eo bet greet an traou, e hellfe ar respontou beza bet disheñvel, beteg eur serten poent da nebeuta.

E Bro-Leon ema Plouvien, stok euz Brest kazimant, pa n'ema nemed 15 km euz brasa kêr Breiz-Izel. E kanton Plabenneg ema, hag eur barrez diwar ar mêz e oa beteg eun nebeud bloavezioù zo. Kuchennadoù tiez nevez a zo bet savet eno avad, evel tro-war-dro Brest partoud, ha kustum eo bremañ kalzig tud euz Plouvien da vond da labourad bemdeiz da Vrest: ne vezont er gêr eta nemed pa ne labouront ket, en noz, e fin ar zizun, e-pad o devezioù-diskui.

Ar henta rumm goulennou he-deus greet A.V. Arzur ouz tud Plouvien eo: *daoust ha komz brezoneg a reont ingal?* Bez' ez eus kazimant 60% anezo hag a ra (pe gentoc'h, 60% euz ar re o-deus respontet). Pa zo ivez 26% hag a gompren heb kaozeal, n'eus eta e Plouvien nemed 14% ha n'o-deus ket a anaoudeger euz ar yez.

- Kosoc'h a ze e vezer, avad, gwelloc'h a ze eh anavezet ar yez:
- 96% euz ar re o-deus 66 vloaz hag ouspenn,
 - 93% euz ar re o-deus etre 51 bloaz ha 65,
 - 79% euz ar re o-deus etre 41 hag 50
- a oar mad ar brezoneg. Med o komz brezoneg,
- n'eus nemed 33% e rumm ar re o-deus etre 26 vloaz ha 40,
 - ha n'eus nemed 14% e hini ar re o-deus etre 18 vloaz ha 25.

Er hontrol, pa n'eus nemed 1,4% euz ar re oajet a 66 vloaz hag ouspenn ha ne ouzont tamm brezoneg ebed, ha 2% er memez rumm ha ne reont nemed kompren heb kaozeal, ez eus 30% euz ar re yaouank etre 18 vloaz ha 25 ha n'ouzont ket a vrezoneg, ha 56% – al lodenn vrasa eta – hag a gompren, med n'int ket gouest da gomz. War veteg nebeud, eh adkaver amañ ar memez dregantaioù hag a zo

bet kavet dija e parrezioù all, evel e Trelevenn, e Bro-Dregèr (2). Yaouankoh a ze eo an dud, nebeutoh a ze eh ouzont brezoneg.

Med pelloh eo eet A.V. Arzur gand heh enklask, p'he-deus klasket gouzoud peleh e komze an dud brezoneg. Er gêr, ez eus 40% oh ober ingal (da lavared eo 68% euz ar vrezonegerien), ha 57% (da lavared eo 95% euz ar re a oar brezoneg) oh ober a-wechou. Gand piou e komzer brezoneg er gêr evel-se? Gand e bried, gand e dud, e dud-koz, e vugale, e vugale-vihan. Anzao a ra A.V. Arzur heh-unan n'eus ket kalz tra da denna euz ar responchou war ar poent-mañ, hag en eur feson all e vije bet dleet dezi ober he goulennou. Eun dra a zo sklêr koulskoude, diwar an daolenn he-deus moulllet war ar bajenn 7 euz he leorig, eo e komzer nebeud-tre (ma n'eo ket tamm ebed) a vrezoneg ouz e bried pe ouz e vugale pa ver yaouankoh evid 40 vloaz, hag e reer kalz muioh pa ver kosoh.

Hag en diavêz d'ar gêr, er vuhez pemdezieg? Amañ eo dedennuz-kenañ ar responchou a zo bet strollet gand A.V. Arzur, rag ne oa ket bet klasket beteg-henn mond ken don er munudou. Dre vraz, e lavar 55% euz tud Plouvien e komzont brezoneg gand o hamaraded, gand an dud en em gavont ganto, e-kerz o diduamanchou (o hoari boulou, pe domino), ha se: bewech, aliez, pe a-wechou. War o labour avad, n'eus nemed 43% anezo o komz brezoneg dalhmad pe a-wechou. Er staliou-koñvers e kouez an dregantad da 30. En tiez-bank hag en ti-kêr, eo izelloh c'hoaz, pa n'eus nemed 13% o vrezonega eno. En ti-post eo e komzer an nebeuta a vrezoneg: 6% hepken a lavar e reont.

Evel just, ar re gosa bepred eo a vez techet da gomz brezoneg e kement leh m'en em gavont, zoken er bureoioù. Med ober a ra ar re yaouank zoken gand ar brezoneg war o labour, er hoñversioù hag er zervijou, med pas ken aliez hag ar re goz.

Petra a ziskouez ar hoñchou-mañ? N'eus leh ebed e Plouvien n'e-nije ket ar brezoneg e blas: en ti-post, en ti-kêr, en tiez-bank, er staliou, e vez tud o komz brezoneg heb damanti; sed ez eus eno brezonegerien evid respont dezo, sur mad. Med zoken ma komzer brezoneg (dalhmad, aliez, pe a-wechou) er gêr, gand e gamaraded, gand an dud en em gaver ganto, e-kerz an diduamanchou, war e labour e reer dija nebeutoh, kalz nebeutoh er staliou-koñvers (a ver boazet da vond enno koulskoude), ha nebeud pe nebeud-tre er bureoioù hag er zervijou. Gweled a reer ervad, eur wech all, e komzer brezoneg gand an dud ah anavezet mad, gand ar re a vez darempre-

jou pemdezieg ganto, gand ar gerent, an amezeien, ar gamaraded. Med adaleg ma'z eus kaoz deuz labour, deuz koñvers, deuz paperou, deuz eskemmou e-keñver ekonomiezh pe e-keñver administrasion, ez a an implij euz ar yez war zisterraad.

Hag en iliz? N'eo ket re vraz plas ar brezoneg eno, peogwir ne reer nemed kana kantikou en ofisou, ha ne vez eun overenn vrezoneg nemed eur wech ar bloaz da geñver pardoniou Sant Yann ha Sant Jaoua. Koulskoude, ez eus 26% euz ar re o-deus respontet, hag a gustum ober o fedennou e brezoneg.

36% a lenn « pennadou » brezoneg ivez, emezo.

Selaou brezoneg war ar radio a reer mui pe vui, hervez an abadennou. An hini a veze ar gwella selaouet da vare an enklask a oa keleier kreisteiz ugent: gand 26% e veze heuillet dalhmad, aliez pe a-wechou. War-lerh e teue keleier 7 eur 20 (21%), « Liou an Amzer » (18%), « Ar Seiz Avel » ha « Mesk-ha-Mesk » (12%).

Gand muioh a dud e vez heuillet c'hoaz an abadennou brezoneg war an tele. Da verher, e vez sellet ouz « Noz vad » bewech, aliez pe a-wechou, gand 44%, da zadorn, gand 40%; ouz « Breiz o veva », gand 39%; hag ouz « Hekleo an deizioù » gand 22%.

Etre 6 ha 9% euz an dud eo a zelaou « dalhmad » pe « aliez » an abadennou, war ar radio koulz ha war an tele. N'eus nemed 2,4% euz an dud, da skwer, ha ne anavezont ket an abadenn « Breiz o veva ». Sed a ziskouez e respont an abadennou brezoneg d'eun ezomm.

Med en enklask A.V. Arzur, e oa goulennou all diwar-benn ar pez a zoñj an dud euz ar brezoneg. Marteze ne dlejent ket beza bet mesket gand ar re all diwar-benn implij ar brezoneg. Med notennom diwar ar responchou ez eus:

- 74% hag a gav dezo e ranker « savetei » ar brezoneg. N'eus nemed 18% o lavared ne rankfed ket, hag 8% hag a zo dizeblant.
- 54% a zo a-du gand kelennadurez ar yez. Dizeblant eo 26%. N'eus nemed 7% a-eneb. Direspont eo chomet 13%.
- 39% a zo a-du gand panellou en diou yez war vord an henchou, 30% o veza dizeblant ha 24% a-eneb.
- N'eus bet greet goulenn ebed, war a zeblant, da houzoud hag a-du eo an dud gand eun astenn d'an abadennou brezoneg war an tele

g er radio.

Evel en enklaskou all euz ar memez seurt (3), ema ar bevrvasa euz an dud a-du gand ar brezoneg, sañset. Med adaleg ma houlenner diganto hag a-du emaint gand ar pezh a vije d'ober da « zavetej » anezañ, n'emaint kement ken, pell a-walh alese.

Eun eveziadenn ziweza a dalv beza greet: ma'z eo enklask A.V. Arzur prisiuz-braz da anaoud petra 'zoñj an 907 a dud o-deus respontet dezañ, eo red ivez derhel kont ervad eo an oll re-ze tud a 18 vloaz pe ouspenn.

E niverenn ziweza *Brud Nevez* e oa eur pennad diwar-benn ar Hors. Just a-walh, n'eo ket hepken e Breiz emae prederiet da houzoud gand ped a dud e vez komzet yez ar vro, en tu-hont d'ar galleg. En Enez Kors e ver ivez, hag eno, ez eus bet greet euz zoñdaj war 2000 a dud, d'anaoud an implij a reont euz ar horseg (4).

Seblantoud a ra e komzer muioh ar horseg evid ar brezoneg, hag e vez komzet muioh gand ar re yaouank. Gand 79% euz ar pennou-tiegezh e vez komzet en oll, 71% deuz ar re anezo hag o-deus nebeutoh evid 35 bloaz.

E-keñver micher, e vez komzet korseg gand 61% euz ar pennou-tiegezh hag a zo mistri pe kadrou uhel; gand 69% euz ar hadrou etre; gand 77% euz ar vicherourien; gand 81% euz an implijidi; gand 83% euz ar re o-deus micher « distag » (da lavared eo gand ar re a zo war o hont, micheriu liberal, labourerien-douar...)

An enezourien a orin eo a oar ar gwella ar horseg: 97% euz ar pennou-tiegezh ha 80% euz o gwirgezh eo a zo er stad-ze. Kalz nebeutoh e oar ar yez ar re a zo ganet war an douar-braz pe en Afrik an hanternoz, med n'int dianaoudeg, pa zo eun drederenn o tisklêria eh ouzont.

N'eus forz penaoz, nebeutoh e kaoze ar merhed ar horseg evid na ra ar wazed. Pa oar an daou bried anezañ, e oar ivez o bugale peurliesha (78% anezo). Med adaleg ma n'eus nemed unan euz an daou bried o houzoud ar horseg, e vez desket kalz nebeutoh gand ar vu-

gale, gand 38 pe 27%. Med zoken pa n'eus hini ebed euz an daou bried o komz korseg, ez eus 9% euz o bugale hag a hell henn ober.

Tost d'eur hard euz ar gorsegerien a zo gouest da skriva en o yez, emezo.

Sed aze, a gav din, hag a zo mad da houzoud d'ar vrezonegerien.

F. BROUDIG.

(1) Goulenn al leorig digand A.V. Arzur, Kaelen, Plouvien.

(2) Gweled Brud Nevez, niv. 31, hag ar studi am-eus savet a-hend-all evid kentelou ar CNEC.

(3) Gweled Brud Nevez, niv. 19.

(4) Gweled ar gelaouenn Economie corse, niv. 18, hag eur remta-kont en oksitaneg war L'occitan, niv. 40.

Per TREPOS

**Enquêtes sur le vocabulaire breton
de la ferme.**

**An douar, ar binviji, al labour.
Eur studi talvouduz ha prisiuz.**

20 lur digand Brud Nevez (250 g)

Pladennoù

SEAN O RIADA

(1931-1971)

Deg vloaz a zo bet warlene abaoe ma'h eo marvet ar muzisian iwerzonad **Sean O Riada**, ha da geñver an digouez-se, 'z eus bet goulennet digand ar hizeller ha medaier **Per Toulhoat**, euz Kemper, sevel eur vedalenn en e eñvor. Med piou oa **Sean O Riada**?

Ganet e oa e kêr Cork, e kreisteiz Bro-Iwerzon, ha studiet e-neus e kon-telez Limerick hag e skol-veur Cork, e leh e teskas latin ha gresianeg. Studia a reas ivez ar zonerez e Cork, gand ar zonaozour **Fleischmann**, ha yaouank-tre e teuas da veza eil-rener ar zonerez e servijou ar radio iwerz-neg, hag ivez rener ar muzik en **Abbey Theatre**, e Dulenn.

Savet e-neus kalz a doniou, e-touez ar re-mañ, eun dousenn oberennou hirroh ha donnoh evid ar re all: sone-rez evid tri film, c'hweh **nomos** (eur stumm simfonienn), eun overenn a-bez e gouezeleg; lakeet e-neus muzik war varzonegou, ha labouret e-neus kalz gand eur strollad muzisianed pobl anvet **Ceoltoiri Chualann**, lod anezo o veza bremañ e-barz strollad ar **Chieftains**.

Etretant e oa eet S. O Riada da jom da gornog ar vro, e leh 'veze komzet gouezeleg c'hoaz. Deski gouezeleg a reas, hag e lakeas anezañ da veza yez e familh. Studia a reas er mare-ze sone-rez-pobl Iwerzon kalz donnoh evid a-raog, e-unan evel just en eur zelaou ar ganerien hag ar vuzisianed koz, med ivez en eur vond el levra-ouegou da furchal el leoriou koz. Med ouspenn-ze a reas, son a reas e-unan ouz ar hlavesiñ gand e gamaraded er **Ceoltoiri Chualann**.

Tu a zo da weled diou lodenn e oberennou **O Riada**. Diouz eun tu, eur zonerez uhel, levezonet gand ar bra-sa sonaozourien euz e amzer, pe euz a-raog e amzer eun tamm (**Malher, Schönberg**); ha diouz eun tu all, e lakeas eur vuhez nevez e sone-rez-pobl e vro, en eur studia anezi don da genta, en eur gempenn anezi, en eur veska binviji-sonerez ha ne oant ket bet klevet asamblez beteg ar poent-se (evel an uillean-pipe hag ar hlavesiñ, da skwer). Med n'eo ket dispartiet ken krenn-ze an diou lodenn, kaoud a ree da **O Riada** e oant unanet don e gwirionez, ha soñjal a ree dezañ e oa kalz tostoh outañ sone-rez an amzer

a-vremañ (anvet sone-rez « sérielle ») eged ar pez a veze greet en Europ er hantvejou tremenet gand stummou ar « sonatennou » hag ar « fugues ».

Bez' e heller keñveria e oberennou gand re **Jef ar Penven** ha **Per-Yves Moign** e Breiz. Gwelom anezo a-dostoh a beb eil.

Ar zonerez filmou. Evid tri film e-neus savet sone-rez diwar bro-Iwerzon, euz ar bloavez 1959 beteg 1966, an hini brudeta anezo o veza « Mise Eire » (da lavared eo: me eo Iwerzon). Kemeret e-neus kanaouennou iwerz-neg hengounel, med liestonet ha kempennet e-neus anezo en eun doare brao-eston, hag a blijas kalz d'e genvroidi. Implij a reas doareou heñvel eun tamm deuz re ar zonaozourien vrudet, **Malher** ha **Sibelius**.

Sone-rez simfoni. Plijoud a ree kalz da **O Riada** ar zonerez « sérielle », bet ijinet da genta gand tud evel **Schönberg** e bro an Aotrich, ha soñjal a ree dezañ e oa eun espez « kenlakadur » pe « synthèse » etre ar muzik gouizieg-ze ha muzikou-pobl an Europ. Setu e-neus savet c'hweh **nomos**, seurt simfoniennou. Dibabet e-neus ar ger **nomos** rag ne blijje ket ar geriou all dezañ. Se zo muzik uhel deuz an amzer a-vremañ, sonet gand eul laz-seni gand binviji-kerdin nemedken. Santoud a reer eun tamm levezon ar zonerez « sérielle » warno, just a-walh.

Ar zonerez lakeet war varzonegou. Savet e-neus **Sean O Riada** toniou da

gana barzonegou skrivet gand **Hölderlin** ha gand barzed iwerzonad, e stumm « lieder » **Schubert** eun tamm, med kalz nevsob memestra. Sone-rez eun overenn e gouezleg e-neus savet ivez, med n'am-us ket bet tu da gleved anezi.

Ha kalz e-neus labouret neuze gand **Ceoltoiri Chualann**: muzisianed-pobl o veva oli e kêr Dulenn, o son ouz ar violoñs, ar fleut, ar bodhran, an uillean pipe, **O Riada** o veza ouz ar hlavesiñ eur benveg hag a ro muioh a vlaz d'o muzik. Soñjal a ree dezañ e oa pinvidig-mor sone-rez pobl Iwerzon, med peogwir e oa bet dreist-oll eur zonerez evid tud o chom war ar miz, hag e oa greet gand kanerien pe sonerien o-unan, e-neus klasket **O Riada** he lakead da veza binvidikoh gand kement tra a oa posubl dezañ ober: sone-rez evid eur strollad muzisianed oh implij binviji ken disheñvel hag ar hlavesiñ hag an uillean-pipe. Brao-tre eo ar muizk greet ganto, trizeg vloaz ben-nag 'zo. 'Barz ar stumm-ze, n'eus ket bet greet gweloh abaoe, ha kalz o-deus kollet ar **Chieftains** en eur lezel ar hlavesiñ a-gostez.

Eur bern e-neus digaset **Sean O Riada** da vuzik ha da zevenadur Bro-Iwerzon, ha ma ne vije ket bet deuet karrig an Ankou da glask anezañ ken abred (marvet eo d'an oad a 40 vloaz), e-nije bet greet sur a-walh kalz muioh c'hoaz.

J. GOYAT.

Eur heltiegour dianav: Ar frer Frañsez Uguen.

D'an 3 a viz gwengolo diweza, dre eur maro trumm, d'e vloaz ha pevar-ugent, eo eet da anaon ar **Frer Frañsez Uguen**, e skolaj Intron Varia Pennfeunteun, e Kastellin. Beva ree eno en e retred abaoe eun nebeudig bloaveziou. Ezel e oa euz **Urz ar Fre-red a Bloermel**, bet savet gand an **Tad Jean-Marie de la Mennais** er bloaz 1917. Kelenner eo bet e meur a skol en eskopti Kemper ha Leon. Kelenner eo bet ivez e Jersey ha rener skol e Brasparz, raktal a-raog ar brezel diweza.

Ar Frer Uguen ne oa ket, marteze, ken anavezet-se, daoust ma oa unan euz an dud desketa, e Breiz, war ar yezou keltieg: gouezeleg, kembraeg, kerneveg, hag evel-just ar brezoneg yez e gavell, a studias, e heller lavared, beteg e huanad ziweza. Anaoud a ree pemp pe hweh yez all ouspenn. Eur yezoniour mad e oa, med didrouz ha dihloar eo bet a-héd e vuhez penna-benn.

Darempred e-neus bet dre lizer gand keltiegourien vrudet evel an Aotrounez **Fleuriot** ha **Gwionvarc'h** hag o-deus bet tro d'en em vataad euz e gavadennou, rag eur furcher tig a levriou koz e oa.

Daoust dezañ da veza bevet divrud, lezel a raio e ano, koulskoude, war al leor kenta bet savet evid deski war-eün ar brezoneg er skoliou: **Me a zesk brezoneg (Mon premier livre de breton)**.

Savet eo bet al leor-mañ, war hou-lenn an Aotrou **R. Delaporte**, a roe, d'ar mare-ze (1938), arnodennou brezoneg (eun doare certificat), e skoliou kristen kantoniou Pleiben, ar Hastell-nevez ha Kerahez. Ar Frer Uguen a oa neuze rener-skol e Brasparz pa oen galvet da vond di da genlabourad gantañ da zevel al leor nevez. An Ao. Delaporte a zeuas ivez d'or gweled ha da rei deom aliou. Med kudenn ar reizskrivadur, hag ar brezel o tigeri prestig goude a viro ouz al levr da vond dindan ar wask. Ne vo moulet nemed er bloavez 1941, e K.L.T. e ti Oberthur e Roazon.

Eul leor eo hemañ hag e-neus greet kalz berz kerkent ha ma teuas euz ar wask. Goude teir mouladenn, ez eus bet gwerzet anezañ 22.500 skwerenn, koulz lavared oli er skoliou kristen. An trede mouladenn, an hini a heller c'hoaz da gavoud e gwerz (1), a zo bet moulet gand **Otlole** e moulièrèz Bro-Leon e Landerne e 1943.

Ar Frer Uguen a zo bet, eun nebeud amzer kenskriver d'ar **Courrier du Finistère** ha **Progrès de Cornouaille**. Embannet e-neus bet er gazetenn-ze meur a studiadenn diwar-benn Abati Sant-Vaze Penn-ar-Bed, ha war an anoiou leh brezoneg a gaver penn-da-benn d'an henchou koz romaneg e Breiz-Izel.

En e yaouankiz e-neus bet ivez skrivet eun danevell bennag e **Feiz ha Breiz** an **Ao. Perrot** dindan ar zinaur **Yann Zoudard** (Gweled **Feiz ha Breiz** 1922). Soudard e oa e Gwengamp ha setu perag e sine evel-se.

Neuze eo e reas anaoudègèz gand unan euz skrivagnerien wella Bro-Dreger: **Erwan an Moal (Dir-na-Dor)** hag a oa o chom e Kermabrouz e parrez Koadout, tostig da Wengamp. An darempredou e-neus bet gand ar skrivagner-ze ne hellont nemed beza kresket c'hoaz e anaoudègèz hag e garantez evid ar brezoneg.

Eun darempred all a zo bet talvezet dezañ c'hoaz. Kamarad e oa da **Yann Schier**, diazezour **Ar Falz** a oa soudard asamblez gantañ er memez kazarn. Meur a wech am-eus bet klevet

anezañ o komz euz e vignon mad Yann Schier.

Perz a gemeras ivez, em 'flas (rag nahet am-boa mond ha me pedet gand **R. Hemon** e-unan), e bodadeg ar « peurunvan » e Roazon er bloaz 1941. Med ne fellas dezañ biskoaz ober implij euz ar skrivadur-ze en e skridou.

E **Breiz o veva**, abadenn savet diwar-benn **Ar Skol dre Lizer** e heller gweled ha klevet ar Frer Uguen o komz euz e levr **me a zesk brezoneg**.

Aketuz e oa da lenn **Brud Nevez** el leh ma plije dezañ dreist-oll ar studiadennou a helle beza enni diwar-benn tra pe dra.

Da geñver e interamant, kanet penna-benn e brezoneg, e chapel Intron Varia Pennfeunteun, dirag e arched, a lavaris dezañ, a-greiz kalon, eur Henavo diweza er yez a garas hag a studias beteg e varo.

V. SEITE

(1) e Skol dre lizer, Ti-Karré, Kastellin.

PAOTR TREOURE MOJENNOU

20 lur (200g)

Keleier ar miz.

Euz an eil devez d'egile

– Eun tamm mad a hekleo e-neus roet ar Rektor Akademiez d'an divizou bet kemeret gantañ war dachenn ar gelennadurez: anvet e-neus 4 skolaer da vond ar bloaz-mañ a skol da skol da zikour ober kenteliou brezoneg, er skoliou-mamm hag er henta derez. Anvet ez eus bet a-hend-all talvoudegez 12 kelenner (rag hanter-bostou a zo), evid kelenner ar yez en 11 skolaj ha 14 lise. E kevrennou keltieg skoliou-meur Roazon ha Brest, e vo anvet beb a gelenner all. Setu aze petra eo ar bloavez kenta euz ar plan war dri bloaz prometet evid ar brezoneg. Sañset e talher da studia petra d'ober pelloh er bloaz a zeu.

– En a-raog, e-noa disklénet sindikad an F.E.N. ne oa ze oll nemed « eur wellaenn vihan ». Termal a ree ivez abalamour ma n'eo bet anavezet ar plan nemed diwezd-tre, eur wech ma oa bet diazezet an implij-amzer. War ar miz, eme ouspenn ar sindikad, ez eus bet anvet an nebeuta a gelennenen (e-keñver ar hêriou), pa'z eo brasoh an ezommoù eno.

– Bannielou gwenn ha du a oa gand ar batroned vihan hag etre deuz a Vreiz hag a zo bet o vanifesti e Pariz d'an 13 a viz gwengolo.

– Evel en oll skoliou all o-deus kroget ar henteliou er « Conservatoire régional de musique, chants, danses et sports traditionnels de Bretagne », e Plañwour, e-tal an Oriant. Bez' e vo roet diou eurvez kenteliou ar zizun d'ar re a zo o chom en Oriant, eun devez leun beb pemzek-teiz d'ar re a zo euz pellohig, hag aozet e vo pevar staj ar bloaz evid ar re a zo re bell euz an Oriant. Med pa zofijer, peseurt ano brezoneg he-deus ar Skol-Uhel-mañ? War a zeblant eo bet dizoñjet a-grenn gand **Paolig Montjarret** rei unan dezi!

– Sañset, n'eus P.A.C. ebed ken e Brest. Pa'z eo bet deuet ar Palez, e vo bremañ evel e lehiou all, eun **Ti ar zevenadur** Daniel Hanivel eo a zo bet anvet e penn an ti nevez. Bet eo bet, a-raog, o labourad e Nevers, el Limousin hag e Douai.

Tregont o vanifesti

– Hervez an tele, n'eus bet nemed 30 bennag a dud o vanifesti dirag **Ti ar Rektor Akademiez** e Roazon, d'ar 15 a viz gwengolo. Dre ma n'eo ket renket mad ar henteliou brezoneg e oa bet aozet ar vanifestadeg gand **Unvaniez ar gelennerien war ar brezoneg**, renet gand Tugdual Kalvez ha bet savet e-pad an hañv e-diañv ha kazimant a-eneb ar sindikajou. Euz eur whitadenn ez eus bet komzet. Pennadou hir ha niveruz a oa bet koulskoude war ar hazetennou pemdezieg evid kemenn ar vanifestadeg, hag a oa harpet a-hend-all gand **Kuzul ar Brezhoneg**, **Unvaniez ar Studierien war ar brezoneg** hag an **U.D.B.**, med pas gand an emzao **Ar Falz** « anezañ e-unan ». Kement-mañ dre ma ne oa ket sur **Ar Falz** e oa « progressiste » a-walh an unvaniez yaouank, med lezel a ree heh izili da vond da Roazon ma karent.

– Kenteliou brezoneg a zalh d'embamm koulz an **Télégramme** hag an **Ouest-France**, eur wech ar zizun. Med ne vez ket roet war **Radio-Breiz-Izel** beteg-henn, evel a veze a-raog war **Radio-Brest**. War an **Télégramme** e-neus kroget Visant Seite gand eur rummad nevez a genteliou: **Deskom brezoneg**, evid ar re a zo barreg dija war ar yez. Er memez mod eo krog A. Merser war **Ouest-France** gand kenteliou all, anvet **Beva e brezoneg**.

– Diwar ar bloaz-mañ, e heller en em enskriva e Skol-Veur Breiz-Izel e Brest, da gaoud eul lisañs nevez war ar brezoneg. Digor eo ar studio da gement hini e-neus eun DEUG, ha n'eo ket hepken (evel warlene) d'ar re o-deus an DEUG saozneg. Eul lisañs « daou benn » eo, anvet e gwirionez « a yezou, a lennegeziou hag a zevenaduriou breizeg ha keltieg ». Dibab a hell eta ar studierien poueza, pe war ar yezou keltieg, pe war zevenadur ar broiou keltieg. A-hend-all, e hell n'eus forz piou heulia ar henteliou evel « auditeur libre ».

– « Mieux que nippon, c'est breton! » Setu petra lavar heb marhata an ao. Karcher, unan euz pennou braz ar gompagnunez Citroën e Roazon, diwar-benn ar wetur nevez BX, hag a vez fardet penn-da-benn, gwir eo, en uzin Roazon. Biskoaz ne oa bet klevet c'hoaz kemend-all! Kenteliou brezoneg a raje vad da gazetennenen **La Bretagne à Paris** heulia

avad: pa'z eo deuet ar BX er-mêz, o-deus skrivet e lizerennoù braz a-uz d'he foltred: « Eur breizeg karr-tan. Biskoaz kemend-all, bepred! »

– Hervez ar statistikou diskullet gand Ministr an Deskadurez, ez eus bet e 1981 5,74% euz ar re o-deus klasket kaoud ar vachelournez o tibab eun amodenn en unan euz yezou bihan ar Frañs. C'hweh vloaz 'zo, ne oa nemed 2,39%. Diwar an 8 261 a oa anezo oll, ez eus bet 6 667 o tibab an oksitaneg, 1 194 o tibab ar brezoneg, 623 ar horseg, 205 ar hatalaneg ha 195 an euskareg.

– Votet e-neus **Kuzul Bro-Vreiz** eur yalhad a 200 700 lur d'ar C.N.E.C., da rei kenteliou brezoneg dre lizer n'eo ket hepken d'ar gelennenen, med d'an oll.

– E-pad an diskar-amzer, zo bet eun tamm mad a reuz e Brest, da heul diesteriou braz ar porz rapari ar batimañchou. Setu pa'z eo bet chomet sac'het ar harr-ferry « Breiz-Izel » ha pa'z eo bet kaset gand Kompagnunez ar B.A.I. da zresa da borz Barry, zo bet tabut a-berz an oll gostezennou politikel, ha dreist-oll en tu kleiz. Respont Alexis Gourvennec: n'e-neus ket a genteliou da gaoud digand den e-keñver « régionalisme », emezañ. Dihortoz ivez e zoare da zisplega eo « da Vro-Gembre » (ha n'eo ket da Vreiz-Veur!) e oa bet kaset ar ferry da renka. Ha kaoud a ree dezañ e komprenje gweloh labourerien Vrest anezañ, p'e-noa kaset e vatimant da renka en eur vro geltieg?

– **N'eus netra cheñchet abaoe an 10 a viz mae**, eme krak-ha-berr ar 120 a dud a oa bodet d'an 3 a viz here e Lotudi, da geñver Kendalh **Diwan**. Hag o-deus taolet ar beh koulz war Vinistr an Deskadurez ha war zindikajou 'zo evel an **F.E.N.** hag eo dre o faot, an eil hag egile, ma n'eo ket bet lakeet **Diwan** c'hoaz e servij publik an deskadurez. Huchal o-deus greet ivez tud **Diwan** pa n'o-deus ket bet atao ar zikouriou a oa bet prometet dezo. Setu m'emaint o vond da zigori heb damanti eun hanter muioh a skoliou, 'benn ar bloaz-skol da zond. Studial a raint ivez penaoz digori klasou CP a vije desket enno brezoneg ha galleg war eun dro. André Lavanant eo a zo bet anvet da Brezidant e plas Reun an Ostiz. « Souezet eo, emezañ, o weled an dud e karg euz an tu dehou oh en em drei war-zu Diwan. »

– Trei eur film a zo bet greet e Klohaz-Karmoed, evid ar chadenn FR3. A-benn ar bloaz a zeu, e tleje beza gwelet war an tele, er Frañs a-bez. War a zeblant eo eur film e galleg dreist-oll, gand eur bomm bennag a vrezoneg e-barz. Konta a ra istor Frañsez Laorañs, bet fuzuillet e-pad ar brezel 14, pa ne oa gouest da respont d'e varnenen nemed e brezoneg. Gand Philippe Durand eo bet skrivet ar scenario hag eñ a

gaso an abadenn da benn. Filmou all e-neus bet troet a-raog, dreist-oll **Yezh ar vezh** (med ne oa ket dispar hemañ). Mab Frañsez Laorañs, hag a zo bremañ o chom en Oise, a zo bet kaset eul lizer gantañ d'ar hazetennoù o veza m'eo bet « spontet » o kleved emaeer o vond da drei eur seurt film diwar-benn e dad.

– E fin an hañv, ez eus deuet eul leor all gand Per-Jakez Helias. **L'herbe d'or** (embannet gand Juillard). Berz a ra kenta romant ar Bigouter, peogwir zo en em gavet dija da veza gwerzet 100 000 skwerenn deuz outañ. Dibabet eo bet, ouspenn-ze, da veza e-touez an 40 leor hag a hellje beza roet dezo ar priz Goncourt e miz du. Tro e-neus bet Per Helias da zisklêria e oa bet troet **L'herbe d'or** evid eul lod diwar eun destenn vrezoneg bet displeget gantañ gwechall war ar radio.

Estreged bruzunou?

– Kenteliuz eo lenn war an **Télégramme** lizerou al lennenen diwar-benn **R.B.O.** Klemm a ra kalz abalamour ma n'hellont ket kleved ken ar chadenn **France-Inter** war an M.F. Skriwa e-neus greet unan, da skwer: « ar Vretoned a gavo dezo n'int ket Frañsizien ken, hag ez eus bet greet eur wir hold-up en o heñver » en eur denna **France-Inter** a-ziwar an M.F. Respont a ree eul lennerez all, stad enni, en eur lavared eo **R.B.O.** ar radio nemeti ha ne vije ket euz a Bariz.

– Da Zant Brieg eo deuet, d'an 10 a viz here, Ministr ar Hultur, an ao. Jack Lang, da zigon war an ton ofisiel ar h/C.A.C. nevez, eur seurt « ti ar zevenadur » hag a zo bet koustet 30 milion. War dachenn ar zevenadur, eo « eun darvoud a-bouez e Breiz », eme ar Ministr e-unan. Disklênet e-neus a-hend-all eo « tremenet an amzer ma ne roe ar stad nemed eun toullad bruzunou d'ar rannvroioù. » E-pad kantvejou, emezañ, eo bet laeret ha paourraet ar re-mañ. Eun digoll a dileont kaoud evid se. Muioh a blas a rankje rei ar radio hag an tele da yez ar rannvro, eme c'hoaz Jack Lang.

– Ha gouzoud a nit ped chapel a zo e Breiz? Hervez Henn Maho, Prezidant **Breiz Santel**, e vefe 1 500 iliz, 6 500 chapel, 7 500 feunteun, 14 000 kroaz. Laosket e vez kalz anezo da goueza en o foull. Evid ad-sevel anezo pe derhel anezo e stad vad, eo bet savet ar vreuriez **Breiz Santel**, tregont vloaz a zo deuz se. Hanter miz here, zo bet deveziou-studi e Poñdi diwar-benn labour ar vreuriez, hag eun diskouezadeg.

– E daou zevez, eo 33 000 a dud o-deus darempredet **La Fête du**

Peuple Breton, anvet ivez **Gouel Pobl Vreizh**. Nebeud-tre a blas e-neus ar brezoneg er gouel. E diavéz d'ar staliou bet savet gand an embannerien leoniou brezoneg (evel A. Merser hag a werze leoniou **Brud nevez** ha re **Emgleo Breiz**), ne veze gwelet a vrezoneg nebleh. Euruzamant, e oa **Youenn Gwernig** o kana, ha **Strollad ar Vro-Bagan** o hoari e **Spontuz Circus**.

Bet eo bet J. Salaun, hag e-noa embannet e niverenn ziweza **Brud Nevez** eun droidigez euz eun danevell balestinian, o kinnig anezi d'ar Balestinianed a oa er gouel: trugarekaet eo bet ganto.

- War-lerh diskouezadeg Beaubourg, eo bet prenet unan euz taolennou Yves Tanguy (euz 1 929), ha tro a vo da weled anezi benn eur pennad en eur mirdi euz ar vro.

- Eun Amerikaneg hag he-deus greet eun dezenn diwar-benn ar han hag ar muzik e Breiz eo Lois Kuter. Deuet eo da dremen tri miz e Breiz. Ema-hi ivez e penn an emzao amerikan evid divenn ar brezoneg. Digemeret eo bet e Brest gand sekretourien **Emgleo Breiz**. A. Keravel ha J.P. Thomin.

An Aviel en e bez e brezoneg

- Deuet eo er-mêz **Aviel Jezuz-Krist** e brezoneg. Troet eo bet gand eur skipaill a zo bodet dindan paeroniezh **Kenvreuriezh ar brezoneg**, endro d'an aotrou 'n eskob Fave, ha d'ar chaloni Elard. Diwar bluenn an tad Mark, euz Landevenneg, eo an notennou. En abati Landevenneg, dres, e vez kavet an Aviel da brena. Stumm eul leor godell kaer a 400 pajenn a zo warnañ. Tro on-nevo sur mad d'ober hirroh kaoz diwar-benn an destenn-mañ euz an Aviel.

- Eun niverenn « ispisial » diwar-benn ar brezoneg he-deus embannet ar gazetenn **Breizh**, e miz here. Nemed eo e galleg ar 17 pajennad bennag a zo enni diwar-benn ar yez. Studia a reer dreist-oll ar hudennou a zo da ziazeza keleennadurez ar yez er skoliou. Taer eo e bennad da Yvonig Gicquel, en e bennad-stur, a-eneb ar gouarnamant a-gleiz: « kaozeal kalz a ra », emezañ. Notennom ouspenn eun draig: ne venger ket **Brud Nevez** e-touez ar helaouennou brezoneg a ginniger ober anaoudegez ganto, pajenn 7: n'eo kement-mañ, sur mad, nemed eun ankounahadenn.

- Eur milier a zinaturiou eo a zo bet dastumet dija war mennad **Ar**

Gelennerien Vrezoneg a zo da veza kaset da Brezidant ar Republik ha da Vinistr an Deskadurez. Da gaoud ar mennad, e heller skriva Bureo 24, Ti ar Bobl, e Brest.

- D'ar zul 19 a viz kerzu, e vo evid ar wech kenta eun deveziad **Breiz a gan** e Gwengamp. Pedet eo an oll lazou-kana euz ar vro da vond di en deiz-se, ha meur a hini o-deus prometet mond a-benn bremañ. Tri don o-devo da gana e brezoneg, unan anezo o veza eun ton Nedeleg. Gand **Kendalc'h** e voa aozet an deveziad.

P.M. Mevel ha Naig Rozmor

Ha lennet ho-peus
o feziou-c'hoari nevez?

Ma n'ho-peus greet, grit dioustu!

- 1) **Planning an diaoul; Ar rejim.** (16 lur - 90 g)
- 2) **Ar wignavaou; Ar veaj organizet.** (16 lur - 90 g)
- 3) **Ar hao antiatomeg; An toull-kuz.** (16 lur - 90g)
- 4) **Krouidigez ar vaouez; An enklask; Ar psikolog; Gwenn ha du.** (10 lur - 100 g)

C'hoariet e vezont gand
STROLLAD AR VRO-PAGAN
It da weled anezo!

Lizerou

Resevet am-eus hizio **Leor Iesanoïou Leon Mikael Madeg**, ha komañset 'm-eus da lenn anezañ. Plijuz-kenañ eo ha da va zofij, leoriou euz ar seurt-se eo a vank d'ar brezoneg. Tresadennoù J.Y. **Andre** ha **K. Foisnon** 'zo plijuz ha brao. Se a vanke ivez.

H.A., Brest.

D'paouez reseo emañ an eil skwerenn euz ho kelaouenn, niverenn 57 **Brud Nevez**. Plijet on ganti kalz, rag peadra ez eus da lenn, ha moulllet eo en eun doare sklêr. Ho trugarekaad-a ran evid beza he haset din. Kontant on o reseo **Brud Nevez**. Daoust din koumananti da veur a gelaouenn vrezoneg, e koumanantin dezi ar bloaz a zeu. Lennet em-eus e roit tro d'an dud da reseo eur skwerenn evid netra, neuze e roan chomleh eun den deoh...

E.G. Redon.

Lennet am-eus an niverenn 57 euz **Brud Nevez**. Mad-tre am-eus kavet anezi; an danvez oh ober anezi, ar stumm e-neus cheñchet. Kalz plijusoh eo bremañ lenn ar skridou. Red e vo deoh kendalh gand ar stumm-ze.

Klevet em-eus ahanoh o komz e-barz ar radio disul da noz, war **R. B. I.** Souezet-tre on bet p'ho-peus lavaret n'eo ket ar skol he-deus lahet ar brezoneg! Biskoaz kemend-all! Spontuz eo an dra ho-peus laret aze. Ne gredan ket c'hoaz ho-peus gallet komz er mod-se, peogwir eo anad mad an emgann renet gand ar skol 'eneb ar brezoneg abaoe bioaveziou.

A-du on ganeoh, pa lavarit eo kudenn ar brezoneg eur gudenn ekonomiezh. Gwir eo e komzfe an dud brezoneg ma tigaste ze eur goumid bennag dezo. Ar brezoneg a zo bet laosket a-gostez peogwir n'e-neus talvoudegezh ebed war dachenn an ekonomiezh. Gwir eo. Med eur gudenn politikerezh eo a-raog toud. Ar vourhizien, deuet mestr e Bro-Hall, o-doa interez da laza an oll rannyezou, ha dre ar skol o-deus gallet dond a-benn euz ar gudenn-ze.

Ar politikerezh, an ekonomiezh, ar skol, tri dra a labourer war ar memez tachenn evid ar memez rummad tud: ar vourhizien. Ar skol he-deus lahet ar brezoneg, pe dost. N'eus nemed ar skol hag a hallo savetei eun draig bennag euz ar brezoneg. Spered an dud e-keñver ar brezoneg a jeñcho pa vo desket ar yez evel a zo gleet er skol. Med gwir eo, ma ne vo ket adlakaet ar brezoneg da dalvezoud er vuhez pem-dezieg war dachenn an ekonomiezh, ar hofivers, al labouradegou, ar bureoïou, hag all, ne vo ket save-teet. Ar re a studio ar brezoneg evid o flijadur a vo komprenet evel tud « marjo ». Evid cheñch an traou, e vo red digori frank doriou ar skolachou. Peotramant e vo fin. Me gred'zo eun tammig chañs bremañ. An traou a ya war-raog eun tammig, d'am zofij. Med 'pad pegeid?

P.G., Gwengamp.

T pe D?

- 1) Skrivet 'vez **N'eus keT** a vara, ha lennet **N'eus keD** a vara.
- 2) Skrivet 'vez **Troet eo beT** an douar **kaleD** ha paour, ha lennet **Troed** eo **beD** an douar **kaleD** ha paour.
- 3) D'am zofij, e vefe mad lakaad eun **d** e fin **ked** hag e fin an anioù-gwan-verb, evel e skriv **J. Abask** da lavared eo, ar gensonenn vlod en degouez-se, evel e vez greet en anioù-gwan hag en anioù. Eсад a rafed evel-se an distagadur pa vez da « erea » kensonenn dibenn eur ger gand ar vogalenn e penn ar ger all.
- 4) Kement-se a gaver dija, da skwer, e **An Ti Satanazed**, bet embannet gand **Studi** e 1976, hag e leoriou all savet gand kelennerien euz Skol-Veur Brest.

Korantin Riou.

Notenn a-berz Brud Nevez: evid pezh a zell **Brud Nevez**, ne fell ket deom cheñch a zoare-skriva keit ha ma ne vo ket eun emgleo etre an oll gelaouennoù brezoneg, pe ar beurlvrasa anezo da nebeuta. Evid pezh a zell skriva **ked** ha **d** e fin an anioù-gwan-verb, e rankfe an oll re hag a ra gand doare-skriva ar skol-veur en em gleved en araog evid henn ober.

KaleD ha paour: gwir eo marteze evid ar Vro-Vigoudenn, med n'eo ket evid an darn-vrasa euz Breiz-Izel. Kaleteet e vez ar gensonenn dirag **ha** Evid an anioù e vez lakeet ar gensonenn « deveradurel », alese **munut** pa vez lavaret **munutenn**.

Kalz Brezonegerien n'anavezont ket c'hoaz **BRUD NEVEZ**

Sur eh anavezit-c'hwi keneiled, kamaradou, amezeien, tud hag a vije laouen o lenn eur gelaouenn vrezonég evel **Brud Nevez!**

Evid ma vije gwelloc'h anavezet ar gelaouenn, om prest da gas eun niverenn evid netra d'an oll dud a rofeh deom o anoïou.

Lakit amañ eta anoïou an dud a garfeh e vije kaset eur wech **Brud Nevez** dezo evid netra, hag e vo greet.

Trugarez deoh en a-raog!
Brud Nevez, 6, ru Beaumarchais, 29200 Brest.

Kasit, mar plij, eun niverenn euz **Brud Nevez** evid netra da :

Ano hag ano-bihan :

o chom e

Skrivit deom eta war eur follenn wenn anoïou an dud a garfeh e vije kaset eur wech *Brud Nevez* dezo evid netra, hag e vo greet, ha digasit deom ho listennad anoïou. Trugarez deoh en a-raog.

Leor ar miz

AVIEL JEZUZ KRIST

Troet gand “Kenvreuriez ar brezoneg”

Eskopti Kemper ha Leon

Raglavar gand an Ao. 'n eskob Barbu

Notennou gand an tad Mark

Embannet gand “Ar skol dre lizer”

E gwerz en Abati Landevenneeg

pe e ti “BRUD NEVEZ”

Priz : 63 lur + mizou-kas